

splanr!


# Ar gennad prevez oc'h ober e doull el liseoù labour-douar



Atelier Lugus

A-greiz ma oa an agro-industriezh o kemer plasoù e kuzulioù merañ liseoù prevez pennañ al labour-douar e Breizh, e oa ar Ranvro o reiñ 53 milion a euroioù eus skoazelloù-arc'hant d'al liseoù-se, en dek vloaz diwezhañ. An dibab-se a lak en arvar deskadurezh publik al labour-douar hag treuzkemm agro-ekologel ivez.

10 €



# Ar gennad prevez oc'h ober e doull el liseoù labour-douar

*Enklask bet embannet e miz Here ha miz Du 2025*

**U**n afer brevez eo kelenn al labour-douar e Breizh : 80 % eus ar 15.500 skoliad breizhat a oa skoliataet e tiez familhoù a-ziwar ar maez pe e liseoù labour-douar prevez en distro-skol 2024.

Ur perzh dibar hag istorel eo hennenezh e Breizh. Gantañ eo deuet industriezhioù ar boued e-barzh ar skolioù labour-douar.

Galloud ar sindikad labour-douar FNSEA hag industriezh ar boued a zo kaoz da gement-se, evit lod. Niverus-tre e vezont e kuzulioù-merañ kevredigezhioù merañ al liseoù-se, ha bras eo o fouez pa vez anv eus ober divizoù strategel. Bemdez en em ziskouez kooperativoù bras ha firmoù industriezh ar boued el liseoù ha war ar rouedadoù sokial. Ken-aozañ darvoudoù pedagogel a reont gant al liseoù, ha sinañ a reont emglevioù kenlabour ganto.

Treut eo ar peuriñ, neuze, evit kelenn an agroekologiezh hag an treuzkemmoù ekologel, daoust dezho bezañ er programmoù abaoe 2014. Ne vez ket postet kalz arc'hant warno, pa vefe e tiez-feurm al liseoù a ra danvez pedagogel d'ar gelennerien, pe er salioù-klas. Sistem al labour-douar askoridik an hini a vez lakaet war-wel el liseoù, neuze.

Kudennoù bras a c'hell sevel diouzh emrenerezh al liseoù prevez. Kuzh eo ar c'huzulioù-merañ anezho. N'eus dileuriad ebet eus ar gelennerien enno, ha ne c'hellont ket sellet ouzh ar c'hontoù. E The Land, ur c'hampus eus Il-ha-Gwilen, emañ an holl galloudoù gant ar rener hag ar prezidant. Bras-bras eo ar c'holloù arc'hant ennañ, ha bras ivez poan-spered ar skipailhoù pedagogel.

Bras eo an arc'hant a vez roet d'al liseoù prevez-se gant Rannvro Breizh, ouzhpenn, daoust pegen kuzh e vefe o mont-en-dro. Ar Rannvro a sikour dezho da bostañ arc'hant, memes ma n'eo ket rediet d'hen ober. Padal n'eus ket peadra gant al liseoù labour-douar publik : ne vez ket postet arc'hant a-walc'h enno, ha n'eo ket desachet an dud yaouank ganto.

**Chloé Richard, Faustine Sternberg**

## LODENN 1

### AN AGRO-INDUSTRIEZH, PENN-KIL-HA-TROAD EL LISEOÙ LABOUR-DOUAR

p 7

Un dimeziñ evit gwellañ an agro-industriezh ha gwashañ ar c'helenn labour-douar e Breizh. Test eo al lobioù galloudus, a gaver e kement ensavadur ren al liseoù kenkoulz hag e pemdez ar gelennerien hag ar skolidi.

## LODENN 2

### PRODUÏÑ MUIOC'H ATAV A VEZ DESKET E LISEOÙ LABOUR-DOUAR

p 19

Mont war-zu an agroekologiezh a rank liseoù al labour-douar ober. Met chomet eo liseoù prevez Breizh war-lerc'h. Atantoù a vez el liseoù evit kelenn d'al liseidi ha lakaat war-wel penaos e vez labouret ganto. Diskouez a reont ez eus bet dibabet produiñ muioc'h, ha stankoc'h atav.

## LODENN 3

### ARC'HANT PUBLIK A YA D'AL LISEOÙ LABOUR-DOUAR PREVEZ

p 31

53 milion a euroioù. Setu ar sammad a skoaziadennoù direk bet roet d'al liseoù labour-douar prevez gant Rannvro Breizh abaoe dek vloaz. Brokus ar skoazelloù-se pa vez mestr al liseoù prevez war kelenn al labour-douar. Eus tu al liseoù publik e ra diouer an arc'hant.

## LODENN 4

### KAMPUS THE LAND : A-DREUZ EZ A AR RENEREZH HAG AN ARC'HANT

p 41

Mont a ra kuit kalz a implijidi, ne vez ket lakaet al liseoù war-wel... Kollet e oa bet ivez 1,2 milion a euroioù gant an embregerezh er bloavezh 2023-2024. Doareoù Jean-Marc Esnault da ren a vez meneget gant meur a hini.

# Boest du

Etre miz Meurzh ha miz Du 2025 omp bet o kas an enklask-mañ. An ensavadurioù ne respontent ket deomp ha ne zoujent ket ouzh hor gwir da gaout teulioù melestradurel. Ur skoilh bras eo bet deomp. Gant prefetioù Il-ha-Gwilen, Mor-Bihan, Aodoù-an-Arvor ha Penn-ar-Bed, gant Renerezh rannvroel ar boued, al labour-douar hag ar c'hoadoù (Draaf) ha gant Ministrerezh al Labour-douar hon oa goulennet kaout an teulioù a ziskoueze :

- Piv resis a oa ezel eus kuzulioù-merañ al liseoù labour-douar prevez ha publik e Breizh
- Sammad an taos deskardiñ paeet d'ar skolioù-se
- Bilañs kontoù al liseoù hag an atantoù stag outo.

Sañset eo an titouroù-se da vezañ publik, met n'int ket bet roet deomp gant an ensavadurioù.

Sezizet hon eus ar bodad evit an diraez d'an teulioù melestradurel (Cada), un aotrouniezh a zo he c'harg ober diouzh ma vo doujet ouzh ar gwir da bep hini da lenn an teulioù melestradurel. A-du eo savet ar c'hCada gant hor goulenn. Daoust d'an diviz-se ha d'al lizhiri hon eus kaset ur wezh all, n'o deus ket respontet nag an Draaf nag ar ministrerezh deomp.

Gant servijoù ar c'hevredigezhioù er prefetioù omp bet e darempred ivez. Roll izili kuzulioù-merañ meur a lise prevez hon eus goulennet ganto (Le Nivot e Penn-ar-Bed ha La Ville Davy en Aodoù-an-Arvor en o zouez). N'eo ket bet roet deomp nemet roll izili kuzul-merañ The Land (liseoù Saint-Exupéry). Evit an Nivot, da skouer, ne oa nemet ul lodenn eus bilañs kontoù al lise ken kozh ha 2011 da gaout er prefeti. A-hed hon enklask hon eus kinniget d'an ensavadurioù kaozeal ganeomp dre gomz. Nac'het o deus hen ober bewech, pe n'o deus ket respontet. P'hon eus bet respontoù dre bostel e oant berr-tre pe ziglok.

Deus tu ar c'hCNEAP, rouedad ar skolioù labour-douar prevez kevratet gant ar Stad, a vez roet arc'hant publik dezhañ neuze, n'o deus ket roet digarez deomp da atersañ anezho. N'o deus ket respontet d'hor posteloù zoken.

Ur gudenn vras eo ne vije ket posupl kaozeal gant ensavadurioù publik

hag e vije ken kuzh o doareoù. Nec'het omp-ni, kazetennerien, gant ar stad-se eus an traoù.

## **METODOLOGIEZH**

Evit hon enklask n'hon eus labourer nemet war al liseoù labour-douar a ginnig stummadurioù evit produiñ boued hag a gas al liseidi da ziplo-moù a roio ar gwir dezho da gaout sikourioù ma savont o atant dezho. 56 skol labour-douar a zo e Breizh.

13 lise a vez bodet en eizh skol labour-douar publik. EPLEFPA a vezont anvet ivez, evit Ensavadur publik lec'hel evit ar c'helenn hag ar stummañ war al labour-douar. Enno e kaver ul lise, un atant hag ur greizenn stummañ a-hed ar vuhez (CFPC) pe ur greizenn stummañ deskarded (CFA).

Evit ar skolioù prevez ez eus 28 lise labour-douar prevez a zo ezel eus rouedad al liseoù labour-douar prevez, ar c'hCNEAP. N'eus nemet 13 eus an 28 lise a ginnig stummadurioù labour-douar. Lod anezho ne ginnigont nemet stummadurioù war ar gwerzhañ pe e gennad ar servijoù. E rouedad ar c'helenn labour-douar prevez ez eus 23 Ti ar familhoù a-ziwar ar maez ouzhpenn. Kevredigezhioù ezel eus rouedad an MFRoù int.

Kalz skolioù labour-douar a zo e Breizh 4 departamant, se 'zo kaoz hon eus divizet chom hep labourat diwar-benn an MFRoù evit hon enklask. E mod-se e oa aesoc'h keñveriañ mont en-dro al liseoù publik hag al liseoù prevez ivez.

Daoust da se e c'hellit skrivañ deomp : [contact@splann.org](mailto:contact@splann.org) m'hoc'h eus titouroù da gas deomp diwar-benn an MFRoù.

Da echuiñ, n'hon eus graet hon enklask nemet e tachenn rektorelezh Roazhon. Kalz kempleshoc'h e vije bet an enklask d'ober m'hon dije lakaet roadennoù rektorelezh Naoned e-barzh. N'eo ket sur e vije bet dedennusoc'h, ouzhpenn, rak nebeutoc'h a liseoù labour-douar a zo e Liger-Atlantel.

## Petra eo Splann ! ?

Ar media kentañ gouestlet penn-da-benn d'an enklaskerezh e Breizh eo *Splann*!. Renet eo gant ur spered dizalc'h ha nann-genwerzhel. Krouet eo bet e 2020 gant ur strollad kazetennerien a zifenne ar frankiz da gelaouiñ diwar-benn an agro-industriezh. Ledanaet zo bet ar sujedoù enklask : kudennoù yec'hed, endro, reizhded ha frankizoù foran. Hep bruderezh, perc'henned, pe skoazelloù ar gouarnamant lec'hel. Kontrolled eo ar media *Splann*! gant e izili hepken, kazetennerien dreist-holl, hag arc'hantaouet gant ar pezh a ro an lennerien ha lennerezed deomp.

## Heulit ac'hanomp war ar rouedadoù sokial:



@Splannenquetes



Splann lanceur  
d'enquêtes



@Splannenquetes



Splann



splann.bsky.social



@splann@mamot.fr



splannenquetes




« Splann ! » :  
quotidien d'enquête



« Splann ! » :  
quotidien d'enquête

# AN AGRO-INDUSTRIEZH, PENN-KIL-HA-TROAD EL LISEOÙ LABOUR-DOUAR

Un dimeziñ evit gwellañ an agro-industriezh ha gwashañ ar c'helenn labour-douar e Breizh. Test eo al lobioù galloudus, a gaver e kement ensavadur ren al liseoù kenkoulz hag e pemdez ar gelennerien hag ar skolidi. Pep tra a vez graet da lakaat war wel ur patrom. Hini ul labour-douar ken askoridik hag an doare d'en em silañ e pep lec'h, a c'hell mont ivez betek magañ yalc'h al liseoù.



- » Embregerezhioù an agro-industri a gemer perzh e liseoù al labour-douar hag a ginnig beajoù skol.
- » An embregerezhioù a zo kannaded e kuzulioù-merañ al liseoù labour-douar prevez, met n'eo ket ar gelennerien pe o sindikadoù.
- » An embregerezhioù a arc'hanta al liseoù labour-douar prevez hag «en eskemm e resevont bruderezh», eme eilrener al lise La Touche.



D arvoud dibenn-sizhun ar Pantekost eo. Bep bloaz, etre Pontrev ha Lannuon, lise bras Peurit, kludet a-us da bPeurit ar Roc'h (Treger) a zesach miliadoù a weladennerien. Dont a ra niverus an dud war letonnennoù unan eus ar brasañ skolioù labour-douar breton da brofitañ eus an dorioù-digor, gant ar gouel hag an abadennoù niverus a zeu da heul.

E kreiz ar gouel, etre ar c'has-tell-aer hag an diskouezadeg trakteurien, emañ tinell ar gevelerien

hag a lak Jeunes Agriculteurs 22, Cerfrance (unan eus an embregerzhioù kontouriezh anavezetañ evit al labourerien-douar), Equicerf (un rouedad kuzul arbennikaet evit micherioù ar c'hezeg) hag ar gevredigezh Agriculteurs de Bretagne.

Honnezh en em ginnig evel chouk « *un doare kehentiñ pozitivel hag a-stroll eus al labour-douar breton* », hag embann a ra ez eo « *dibolitikel hag er-maez ar sindikadoù* ». Krouet e 2012 gant renerien eus an agro-industriezh, al lobi-mañ<sup>1</sup> a zifenn koulskoude ul labour-douar

1] « Le lobby agroalimentaire breton, une machine puissante et bien huilée », 6 a viz Ebrel 2023, pajenn web bet gwelet e miz Genver 2026

askoridik. Enrollet eo e-giz kannad an interestoù<sup>2</sup> war dachennoù an agro-bouederezh e burevioù ar bPen-nadurezh uhel evit treuzwelusted ar vuhez foran (Haute Autorité pour la transparence de la vie publique e galleg).

Lusker an abadenñ  $E=M6$  (war ar chadenn M6), Mac Lesgy, anavezet ivez evit bezañ prezegenner gant savboentoù a-du gant an agro-industriezh, a vez pedet ingal gant ar gevredigezh. E miz Ebrel diwezhañ, e oa eñ aze e-kerzh emvod-meur Agriculteurs de Bretagne<sup>3</sup>.

Ouzhpenn 165 framm zo ezel, hag en o zouez emañ ar c'hooperativoù labour-douar brasañ (Eureden, Evel'Up, Le Gouessant, Sodiaal...) hag embregerezhioù bras labour-douar greantel (Brets, Bigard, Hénaff, Savéol, Sanders...). Kavout a reer ivez meur a lise labour-douar breton hag ar CNEAP Bretagne, rouedad ar c'helenn labour-douar prevez.

## **AGRICULTEURS DE BRETAGNE, UL LOBI OBERIANT**

Al lobi a zeu ingal el liseoù prevez ha publik. E lise labour-douar Caulnes(22), ar rener, M'hamed Faouri, a zispleg

en doa degemeret ar gevredigezh evit ur brezegenn. Ar pal ? « *Deskiñ pe reiñ bommoù prezeg d'ar skolidi a-benn gallout komz d'un doare pozitivel eus al labour-douar ha stourm a-enep an agri-bashing.* »

Lise prevez Peurit zo un ezel oberiant-tre eus ar gevredigezh Agriculteurs de Bretagne, homañ en doa lakaet enlinenn ur bajenn kinig ha daou video eus ar skol war he lec'hienn internet<sup>4</sup>. Bezañ e oa ivez e-touez kevelerien an darvoud La Ferme se rebelle<sup>5</sup>, aozet gant ar gevredigezh e miz Meurzh 2025, ha Savéol pe Eureden a oa eno ivez. Ober a ra anv Peurit alies eus Agriculteurs de Bretagne war e rouedadoù sokial. Banniel ar gevredigezh zo skritellet e-barzh darn eus ar salioù klas memes. Ar skolidi a gemer perzh ingal en ur genstrivadeg poltreoù aozet gant al lobi. Ar bloaz-mañ eo aet ar priz kentañ gant ur skoliadez kentañ<sup>6</sup> klas eus al lise. Aet e oa da « *zisplegañ banniel Agriculteurs de Bretagne e-kichen un tro-pellad saout* » e menezioù Aostria.

Hent micher Danièle Even, prezidantez kuzul-merañ ar skol labour-douar, a ro tro da lakaat war wel al liammoù levezon-se. An desaverez moc'h-se

2] Fiche « Agriculteurs de Bretagne », roll al lobbyisted war lec'hienn an Aotrouniezh Uhel evit an Treuzwelusterezh er Vuhez Foran, pajenn bet gwelet e miz Genver 2026

3] « Retour sur notre Assemblée générale 2025 », lec'hienn Agriculteurs de Bretagne, pajenn bet gwelet e miz Genver 2026

4] Article « Témoignages Lycée de Pommerit », lec'hienn Agriculteurs de Bretagne, pajenn bet gwelet e miz Genver 2026

5] « La Ferme se Rebelle revient pour sa deuxième édition le mercredi 19 mars à la Brest Arena ! », lec'hienn Agriculteurs de Bretagne, pajenn bet gwelet e miz Genver 2026

6] Kemennadenn deus ar gont @lyceepommerit war Instagram, d'ar 17 a viz Gwengolo 2025

zo bet prezidantez Agriculteurs de Bretagne eus 2014 betek 2022. Bez e oa war ar poltred familh, hini lobi ar moc'h, kartennaouet gant *Splann* !<sup>7</sup>. Ezel eus an FNSEA, Danièle Even a oa bet prezidantez kambr labour-douar Aodoù-an-Arvor etre 2016 ha 2025. Un arouez ez eo a ziskouezh pegen liammet eo ar c'helenn labour-douar, an agro-industriezh hag ar sindikad pennañ, e penn ar c'hambroù labour-douar breton.

### **AN FNSEA, UR SINDIKAD A GAVER E PEP LEC'H ER C'HUZULIOÙ-MERAÑ**

Danièle Even n'eo ket an hini nemeti e penn ul lise labour-douar prevez o vesañ ezel an FNSEA. Pep lise a vez meret gant ur gevredigezh, hag ar prezidant anezhi a vez dilennet gant izili ar c'huzul-merañ (KM), an darn vrasañ anezho zo labourerien-douar pe tud war o leve eus sektor al labour-douar bet anvet dre gendibab. An ensavadurioù-se o devez ul levezon kreñv war al liseoù. Daoust ma ne c'hellont ket, da gentañ penn, en em rouestlañ e dibaboù an danvezioù

kelennet, a vez termenet gant ministrerezh al labour-douar, ar c'hKMoù a vot an holl zibaboù strategel. Dibab a reont neuze an hentoù da gemer, pe-seurt arc'hantaouiñ a vo gant an atant hag envel a reont rener ar skol.

### **Anvioù ha micherioù prezidanted hag izili ar c'huzul- merañ n'int ket embannet.**

An aozlun en deus savet *Splann* ! a ziskouez ez eo ezel darn vrasañ prezidanted al liseoù labour-douar prevez e Breizh eus ar sindikad labour-douar muiañ niver, ha hemañ a zifenn ur sell produa-

durour eus al labourerezh-douar, pe neuze ez eo liammet o obererezhioù micherel gant an agro-industriezh.

### **GWELET AR SKEUDENN EN UR PAJENN NEVEZ**

Bez-prezidant KM lise an Nivod e Lopereg (29), Anthony Taoc, saver yêr-indez ha produer edeier, zo merour eus ar gevelouri Le Gouessant<sup>8</sup>. Dilennet eo bet war al listenn FNSEA-JA er gambr labour-douar e 2019.

Claudie Le Menn<sup>9</sup>, prezidantez lise Sant Jozef Kerustum e Kemper, he deus un atant 90 gwizh ha 80 buoc'h laezh hag ezel eo eus an FDSEA 29<sup>10</sup>. Prezidant KM lise La Touche e Ploermael, Noël Danilo, en deus kaset

7] « Copains comme cochons : élus, éleveurs ou écrivains, qui sont les lobbyistes du porc en Bretagne ? », Kristen Falc'hon hag Inès Leraud, *Splann* !, 6 a viz Mae 2024

8] « Une gouvernance démocratique », lec'hienn Le Gouessant, pajenn bet gwelet e miz Genver 2026

9] « Mardis de l'agriculture. La visite de l'exploitation fait le plein », *Le Télégramme*, 11 a viz Even 2014

10] Danevell obererezh 2020, FDSEA Penn-ar-Bed

BANKOÙ HA PRIZACHEREZH  
KONTOURIEZH

SINDIKAD LABOUR-DOUAR  
AN FNSEA

INDUSTRIEZH AR BOUED

KEFRIDIOÙ POLITIKEL

CNEAP BRO C'HALL

PREZIDANT etre 2008 ha 2023

PREZIDANT abaoe 2003



**JEAN SALMON**

- Prezidant kuzul-merañ al liseoù Pommerit ha Ville Davy (2009-2023)
- Prezidant Kambri Breizh al labour-douar (1995-2007)



**MICHEL DANTIN**

- Prezidant FDSEA Savor (1996-2002)
- Kannad e Parlament Europa (2009-2019)

CNEAP BREIZH

PREZIDANT etre 2017 ha 2024

PREZIDANTEZ abaoe 2004



**PAUL DUCLOS**

- Merour Crédit Agricole Morbihan abaoe 2020
- Merour Liger Energie (metanizan) (2011-2024)



**JOËLLE DENOUAL**

- Labourerez-douar e produñ laezh
- Prezidantez Cerfrance 35-56 e-pad 20 vloaz

LABOURERIEH-DOUAR BREIZH

PREZIDANT etre 2006 ha 2024



**ANTHONY TAOC**

- Merour « Labourerien-douar yaoune » (JA) eus Penn-ar-Bed e 2015 ha kannad JA e 2019
- Merour ar c'hevelour Le Gouessant



**DANIELLE EVEN**

- Prezidantez kambri al labour-douar 22 (2016-2025)
- Prezidantez al lobi « Labourerien-douar Breizh » (2014-2022)
- Sevel a ra moc'h



**MICHEL MORVANT**

- Kuzulier-departamant kanto Gourin (1985-2011)
- Prezidant ar Roue Morvan kniezh (1983-2020)



**CLAUDIE LE MENN**

- Feurm moc'h ha laezh
- Ezel eus FDSEA 29



**NOËL DANILLO**

- Prezidant kof lec'hel Crédit Agricole e Ploermael (2008-2024)
- Ezel eus Intercereales (lobi greun)

BESPREZIDANT ar  
C'huzul-merañ abaoe 2003



**MARGUERITE BOURBIGOT**

- Bet e penn Caisse d'épargne et prévoyance Breizh-Broioù al Liger



**ALPHONSE GAUTIER**

- Rener ar strollad Cerfrance Broctliande e-pad 20 vloaz



**PIERRE DESPRES**

- Bet maer La Guerche (2004-2019)
- Kuzulier-departamant kanton La Guerche (2008-2015)
- Labourer-douar

PREZIDANT abaoe 2024

PREZIDANTEZ abaoe 2003

PREZIDANT

PREZIDANTEZ



Kerlelost

La Touche

Kerbenez

Le Nivot

The Land

La Ville Davy

Pommerit

Kerustum

St Yves

PREZIDANTED AL LISEOÙ LABOUR-DOUAR PREVEZ E BREIZH

e atant laezh<sup>11</sup> gant robotoù d'e vab e 2023 gant 75 buoc'h ha 65 hektar hag e-pad pell eo bet goprad ar pourveziñ labour-douar<sup>12</sup>, ezel eo eus Intercereales, ul lobi eus micherioù an edeier savet gant an FNSEA<sup>13</sup>. Bet eo ivez prezidant kef lec'hel Crédit Agricole Ploermael, eus 2008 betek 2024.

Heñvel eo evit prezidant diwezhañ lise Kerlebost e Pondi, Paul Duclos, meur Crédi Agricole ar Morbihan abaoe 2020. Prezidant CNEAP Breizh eo bet ivez eus 2017 betek 2024.

Met anvioù ha micherioù prezidanted hag izili ar c'huzul-merañ n'int ket embannet d'an holl, ha dreist-holl evit ar skolioù prevez. Kement kevredigezh zo, pa vez disklêriet he statudoù, a dle embann anvioù izili ar c'huzul-merañ<sup>14</sup> er prefeti koulskoude. Ur redi a seblant bezañ retoc'h c'hoazh evit kevredigezhioù o verañ liseoù arc'hantaouet gant arc'hant publik, ha dindan kevrat-Stad.

**Ur lezenn evit  
ma « ne vefe  
ket ken kreñv  
dorn al lobiou  
agro-greantel  
war ar c'heleñn  
labour-douar ».**

En desped dimp goulenn meur a-wech, n'eus ket bet c'hoant nag ar prefeti, na renerezh-rannvro ar boued, al labour-douar hag ar c'hoadeier (RRBLK pe Draaf e galleg), na Ministrerezh al Labour-douar, da reiñ anvioù izili kuzul-merañ da *Splann* !. Bodad ar moned d'an dielloù melestradurel zo e karg evezhiañ e vez doujet d'ar gwirse, hag embannet en deus emañ ar gwir ganeomp<sup>15</sup>.

N'eus bet respont ebet eus perzh an ensavadurioù bet savet ar goulenn outo. Ur wech aet e darempred ganto, n'eus ket bet respont ebet digant darn vrasañ al liseoù prevez pe nac'het o deus embann anezho deomp.

N'eo ket sklaer ha gouzañv a ra ar gelennerien hag o dileuridi eus ar sindikadoù pa n'o deus ket dileuridi er c'huzul-merañ, er c'hontrol da guzulioù-merañ al liseoù labour-douar publik<sup>16</sup>, hag alies, ne ouzont ket piv 'vez e kuzul-merañ o lise.

En ul lise labour-douar prevez emañ Marc<sup>17</sup>, dileuriad ar sindikad o

11] « Le temps d'un après-midi, Samuel et Noël Danilo ouvrent leur exploitation au public à Ploërmel », *Ouest-France*, 10 a viz Gouere 2024

12] « Portrait d'agriculteur : Noël Danilo », Video war gont YouTube ArvalisTV, d'an 23 a viz Ebrel 2014

13] « Deux nouvelles pompes à fric actionnées par la FNSEA », Frédéric Pons, *Libération*, 9 a viz C'hwevrer 2004

14] Mellad 5, Lezenn ar 1añ a viz Gouere 1901 a denn d'ar gevrat kevredigezh, lec'hienn Legifrance

15] Mennozh niv. 20254610, Kuzul evit mont e darempred gant an teulioù melestradurel, 4 a viz Gwengolo 2025

16] Mellad R811-12 Kod ar Pesketaerezh war ar maez hag ar mor

17] An dud anavezet dre o anv-bihan hepen a zo bet dizanvet.

prederiañ, war dibaboù zo bet graet gant ar renerez. « Goulennet he deus nullañ ur gejadenn evit hon skolidi, e liamm gant ur raktres pedagogel, gant un den brudet evit kaout bec'h gant ar gambr labour-douar », a zispleg hi. Ur skouer all, ur vodulenn kentelioù diwar-benn al labour-douar biologel, e lec'h ma veze « displeget kaier ar c'hargoù al labour-douar biologel, ar perzhioù mat hag ar perzhioù fall ». Met ar renerezh en deus goulennet cheñch e anv, ha tennañ an dave d'al labour-douar biologel da reiñ an anv « neveziñ er produerezh ».

## UR MANK TREUZWELUSTED

### A GAVER ABEG ENNAÑ

Ar CGT-deskadurezh prevez en doa kaset da benn un enklask<sup>18</sup> e 2024 digant kelennerien al liseoù prevez. Diwar 300 den, 60 % anezho a lavar n'o devez distro ebet eus dibaboù ar c'hKM, ha 23 % anezho n'int ket evit mennegiñ anv ebet eus an izili. Ugent dre gant ac'h ansav e oa bet lakaet gwask gant ar c'hKM war raktresoù pedagogel zo ( nac'hañ temoù zo, mirout ouzh kelennerien pe skolidi kemer perzh hep abegiñ perak..).

# 20 % deus ar gelenne- rien a lâr ez eus bet lakaet gwask gant ar C'huzul war ar raktresoù deskadurezh.

Da respont d'an enklask en doa embannet ar c'hCNEAP d'ar CGT « *an dud [er c'huzulioù-merañ] a gemer perzh en o anv dezho o unan, personel, ha n'emaint ket aze en anv ur framm pe un aozadur* ». Da dalañ eus ar mank treuzwelusted-se, e oa bet douget ur c'hinnig-lezenn<sup>19</sup> d'an 11 a viz Gouere 2025 gant deputeed Talbenn Nevez ar Bobl pe Nouveau Front populaire e galleg, da c'houlenn gwarantiñ, e vo kavet dileuridi ar gelennerien, an implijii, ar skolidi hag ar gerent e-barzh ar

18] « Le Conseil d'administration au sein des lycées agricoles privés », CGT-EP, miz Here 2024

19] Lezenn evit gwellaat treuzwelusterezh ha dileuriadur kuzulioù-merañ an ensavadurioù deskadurezh labour-douar prevez, niv. 1734, lec'hienn Legifrance, 11 a viz Kerzu 2025

c'huzulioù-merañ. « *Ar pal a zo ne vefe ket ken kreñv dorn al lobioù agro-greantel war ar c'helenn labour-douar* », eme bPierre-Yves Cadalen, kannad LFI Penn-ar-Bed.

Ar CGT- deskadurezh prevez en deus savet ar memes goulenn ouzh ar c'hCNEAP. Hemañ en deus respontet : « *Evit ar pezh a sell ouzh ho koulenn kaout ar gwir gant implijidi da gemer perzh er Emvodoù-meur, e talc'homp soñj deoc'h, n'eus ket eus ar gwir-se en hor statudoù.* »

Tanav an harzoù etre sindikad muiañ niver ha kambroù labour-douar<sup>20</sup>, e-giz ma vez diskuilhet gant un danevell eus Lez ar c'hontoù<sup>21</sup>, a gas kemmesk e diabarzh ar skolioù o-unan pa zeu ar Gambr labour-douar da ober abadennoù ingal. Da skouer, ar program « Génération agri »<sup>22</sup> a oa bet savet gant ar sindikad hag ar Gambr, a-benn lakaat ar skolajidi da zizoleiñ bed al labour-douar. Kinnig a reont abadennoù er salioù klas, aze e vezont er forumoù henchañ ha pa vez gweladennet

**Ul lezenn evit  
digreskiñ  
« dizalc'hiezh al  
liseoù labour-douar  
diouzh lobioù  
labour-douar a zo. »**

atantoù. Pe c'hoazh Stage.agricole, ur savenn niverel savet gant ar sindikad Jeunes Agriculteurs, a-benn renabliñ ar c'hinnigoù stajoù, ha graet bruderezh dezhi gant ar Gambr hag al liseoù d'ar skolidi.

**ROUEDADOÙ SOKIAL A-DU GANT  
AN AGRO-INDUSTRIEZH ?**

Kemer a ra perzh al liseoù o-unan e levezon merkoù bras an agro-industriezh, hollvezant en o c'hehentiñ. An

disterañ gweladenn ti-feurm a gemer harp ouzh un teknikour deuet eus ur c'hooperativ pe ur gevelouri mar kar deoc'h. Testennoù an embannoù a lak war-raok an embregerezhioù, ha

ne ankouaeont gwech ebet trugarekaat anezho<sup>23</sup> pe kas da soñj « *ez int emouestlet d'ar re yaouank* ».

War e gont Instagram en deus embannet al lise La Touche e Ploermael (56), bemdez a-hed ur sizhun<sup>24</sup>, skeudennoù o lakaat unan eus e gevelerien war-raok : Seremor, Agrial, Cerfrance,

20] « Les chambres d'agriculture, un outil au service de la FNSEA ? », Nolwenn Weiler, *Basta !*, 16 a viz Genver 2025

21] « Le réseau des chambres d'agriculture depuis leur régionalisation », danevell Lez ar c'hontoù, 22 juillet 2025

22] Teuliad kinnig evit ar programm Generation Agri

23] Post « Zoom sur 3 visites récentes de nos BTS ACSE », kont lavilledavy, Instagram, 16 a viz Genver 2025, post bet gwelet e miz Genver 2026

24] Post « Un jour, un partenaire, semaine spéciale ! », kont Instagram groupe.latouche, 25 a viz Ebrel 2025, embannet e miz Genver 2026

Convivio, Eureden, Nutréa<sup>25</sup>... Un doare da ober ledet mat war rouedadoù sokial al liseoù labour-douar.

Lakaat a reont ivez war wel gweladennoù ar c'hlasoù en embregerezhioù eus an agro-industriezh, da reiñ un tañva sklaer eus o danvez-studi.

Evel ar sizhunvezh « moc'h »-se<sup>26</sup>, aozet gant lise an Nivod (29) evit ar BTU produiñ loened (BTU: Breved Teknikour Uhel pe BTS e galleg). War ar stern : « *Dizoleiñ an danframmoù alc'hwez : Lazhti Cooperl (Lambal), labouradeg Sanders (Sant-Tegoneg), Marc'had ar Moc'h gall gant Evelup ha strolladoù produerien : Eureden, Cooperl, Porelia, Evelup.* »

Er c'hontrol, gweladenniñ produerien nes, frammoù labour-douar e-mod all e vez rouesoc'h en embannoù. Kavet e vezont aliesoc'h en embannoù al liseoù publik, met n'eo ket kempouez kennebeut. « *Magañ a reomp sevenadur hollek ur patrom e lec'h ma krogez gant ur bankour ha prenañ a rez trakteurien divent ha sammañ a rez dle.* », a ziskuilh ur c'helenner a blijfe dezhañ kempouezañ ar gweladennoù.

## **SALOÑSOÙ HA KENSTRIVADEGOÙ AOZET GANT AN EMBREGEREZHIOÙ**

N'o deus ket ar merkoù o far da gaout mennozhioù evit aozañ darvoudoù pe kinnig modulennoù pedagogel. Da skouer e oa bet kaset skolidi Peurit da c'hGoudelin evit un devezh diwar-benn magadurezh al loened<sup>27</sup> aozet gant Eureden an 2 a viz Mezheven 2025. Pe kaset e oa bet c'hoazh skolidi lise labour-douar publik Kernilienn d'an darvoud aozet gant ar strollad kevelourel Even, ha Class Bretagne Nord<sup>28</sup> « *tro-dro d'an agronomiezh ha d'an neveziñ : ezteurel ar pezh zo gallus gant ar genetek* », evel ma 'z eo kinniget war gont Instagram al lise. Keveler all d'an degouezh : Bayer.

Pa ne vez ket savet postoù labour den e karg an darempredoù kenlabour skolioù / liseoù<sup>29</sup> gant an embregerezhioù (Sanders, is-embregerezh d'an embregerezh liesvroad, arbennikaet war magadurezh al loened), ez eo gant an dud e karg ar c'henhentiñ an hini e vez aozet ur genstrivadeg skrivañ<sup>30</sup> « *war un tem eus ar c'heleier kinniget gant*

25] Post « Nutréa, spécialiste de l'alimentation animale en Bretagne », Kont Instagram groupe. latouche, d'an 3 a viz Mae 2025, embannet e miz Genver 2026

26] Post « Immersion 100 % filière porcine pour nos BTS Productions Animales ! », Kont Facebook École Le Nivot, 11 a viz Ebrel 2025, post bet gwelet e miz Genver 2026

27] Post « Les Bac Pro CGEA et BTS ACSE à la journée fourragère Eureden », kont lyceepommerit, Instagram, 2 a viz Even 2025, post bet gwelet e miz Genver 2026

28] Post « Hier nos élèves de 2nd CEC, BTSA première année... », kont lyceedekernilien, Instagram, 6 a viz Gwengolo 2024, post bet gwelet e miz Genver 2026

29] Post « Jean Crosnier Eric Guillermic Paul Duclos », kont Facebook Cneap Bretagne, 20 a viz Even 2025, bet gwelet e miz Genver 2026

30] « Le Concours d'écriture est de retour ! », lec'hienn Eureden, 10 a viz Gwengolo 2025, pajenn web bet gwelet e miz Genver 2026

*bodad kehentiñ ar strollad Eureden » pe c'hoazh un « tournamant videoioù etre-skolioù »<sup>31</sup> (Eureden) evit ar skolidi hag o c'helennerien.*

Kevelourioù zo a vez pedet war-eeun da zont d'al liseoù, e-giz Innoval, un embregerezh servijoù desevel loened, he doa aozet « saloñs ar studier by Innoval »<sup>32</sup> e lise an Nivod e miz Mae 2025. D'un doare pleustrek e vez ar skolidi oc'h eskemm « war-eeun gant tud a-vicher ar gevelouri : rener rannvroel, den e karg an tuta, kuzulierer yec'hedel, kuzulierien, tud atebek ajañs, teknikourien ensperiañ, tud arbennik war ar c'henetek hag ar binvioù leviañ », ha se tout en un « aergel'h joaius ».

## **MESENEREZH HA SPONSORIOÙ, DOAREOÙ D'OBER BOAS**

Broudet e vez ar skolidi o-unan da vont da welet an embregerezhioù agro-induriez-se a-benn gallout arc'hantaouiñ o c'hemer perzh e Trofe etrebroadel ar c'helenn labour-douar (TEKL pe TIEA e galleg, evit Trophée international de l'enseignement agricole) a vez bep bloaz e-pad Saloñs al

labour-douar. D'ar c'houlz-se eus ar bloaz e kaver embannoù gant liseoù ha skolidi e-leizh, da drugarekaat anezho (skeudenn gant lise Caulnes).

Skipailhoù skolidi zo a sav pajennoù a -ratozh da ober bruderezh d'ar gevel-lerien, evel lise Peurit<sup>33</sup>.

Al liseoù prevez a c'houlenn harp digant an obererien-se. « *Skoazelloù*

**« An  
embregerezhioù  
a arc'hanta  
ac'hanomp ha ni,  
a ginnig dezho ur  
gwir bruderezh. »**

*arc'hant a roont deomp  
ha ni, en eskemm, a  
ra kehenterezh dezho  
da vat, reiñ a reomp  
tro dezho da implij sa-  
lioù emvodoù, lakaet  
e vezont war-raok da  
boent an job dating.  
Kevelouriezh ha gounid*

*diouzh an daou du eo ! », eme eil-rener lise La Touche. « E-barzh ar raktresoù neveziñ emaint, hag en oberiadennoù kehentiñ », eme rener nevez-flamm lise Kersavi / La Ville Davy, Frédéric Watine. Displegañ a ra ivez e vez pres-  
tet gant al lise « ar savadurioù evit ar  
frammoù-se, da greñvaat al liammoù ».*

Un doare boas d'ober, evel e The Land, en doa degemeret emvod-meur ar c'hCoordination rurale 35 nevez zo<sup>34</sup>. « *N'hon eus ket bet tro da gejañ gant sindikadoù all, padal en dije gallet bezañ dedennus, eme Victor gant keuz ha eñ*

31] « Le Concours d'écriture est de retour ! », lec'hienn Eureden, 24 a viz Gwengolo 2025, pajenn web bet gwelet e miz Genver 2026

32] Post « Salon de l'Etudiant by Innoval : une 2<sup>e</sup> édition placée sous le signe de la proximité et de l'engagement », Kont Ecole Le Nivot, Facebook, 28 a viz Mae 2025, post bet gwelet e miz Genver 2026

33] Compte tiea2025\_pommerit, Instagram

34] « En Ille-et-Vilaine, la Coordination rurale veut faciliter l'installation des agriculteurs », Olivier Berrezai, Ouest-France, 4 a viz Even 2025



skoliad bet. *Goude an emvod-meur-se e oa un toullad eus ar skolidi o pourmen el lise gant stilioù ar c'hCoordination rurale.* » Ar c'hCooperl, unan eus brasañ kevelourioù desaverien moc'h e Frañs en doa bet tro da aozañ meur a zarvoud eno, en o zouez ur « *bodad-studi war an nevezin da zont* »<sup>35</sup> evit e skipailhoù labour.

E lise Sant Kler / Saint-Clair (44) ez eus ur « *c'henemglev mentorelezh gant an embregerezhioù* » bet sinet gant Terrena<sup>36</sup>, unan eus ar

**N' he deus ket kaset deomp ministrerezh al labour-douar ar sammadoù bet gant ar skolioù labour-douar breton.**

brasañ kevelourioù labour-douar gall. Hevez al lise, ar gevelouriezh-se a ro tro « *da gaout un ambroug eus ar c'hen-*

*tañ : dizoleiñ micherioù, gweladenniñ uzinoù, eskemm gant tud a-vicher ha bezañ soubet er bed kevelourel* ». Evit Jeanne<sup>37</sup>, kelenner eus al lise, n'heller ket degemer se. « *An dra-se zo evel ma vefe lavaret deomp "n'emaout o vont da gomz mann*

*nemet eus al labour-douar kendivizadel". Ne dlefe ket bezañ aotreet reiñ harp da dTerrena pe d'ur gevelouri all.* »

35] « Séminaire prospectif The Land et Cooperl », lec'hienn The Land, 3 a viz Meurzh 2022, pajenn bet gwelet e miz Genver 2026

36] Post « Lors du Salon International de l'Agriculture (page officielle) , notre lycée a franchi une étape ... », Kont Facebook Saint-Clair High School Derval Blain, 17 a viz Meurzh 2025, post bet gwelet e miz Genver 2026

37] An dud anavezet dre o anv-bihan hepken a zo bet dizanvet

An embregerezhioù a skoazell al liseoù ivez dre hanterouriezh an taos deskardiñ. Daoust d'hon goulennoù, hag en desped da ali a-du Bodad ar moned d'an dielloù melestradurel, n' he deus ket kaset ministrerezh al labour-douar ar sammadoù bet gant ar skolioù labour-douar breton. Ar skodenn-se a vez roet gant an embregerezhioù bep bloaz, da harpañ ar moned d'an deskardiñ. Ul lodenn eus an taos (13 %), anvet mentelad, a c'hell bezañ roet d'an ensavadurioù a fell dezho dre ar savenn enlinenn Soltéa. An taos zo un dregantad eus an niver hollek a c'hopridi : seul vrasoc'h un embregerezh,

seul vrasoc'h ar sammad eta.

Rannvro Breizh a fell dezhi diorren ar c'hevelouriezhioù el liseoù publik. Unan eus palioù he Steuñv ober evit dedennusted al liseoù publik 2024-2029 eo. « *Un ensavadur publik omp, hag ar Rannvro zo sañset arc'hantaouiñ hor ezhommoù, eme renerez lise publik Kernilienn, Nadia Conti, taer anezhi pa oa bet graet anv eus se. Ar mesenerezh zo luzhiet evit ul lise publik. Ne lavarfen ket n'hon eus ket, met dister e chom.* » Un dibab dizalc'hiezh en deus ezhomm muioc'h a beadra, dre ret.

**Chloé Richard, Faustine Sternberg**

## PRODUÏÑ MUIOC'H ATAV A VEZ DESKET E LISEOÙ LABOUR-DOUAR

Mont war-zu an agroekologiezh a rank liseoù al labour-douar ober, skrivet eo anat e programmoù o ministrerezh. Met chomet eo liseoù prevez Breizh war-lerc'h. Atantoù a vez el liseoù evit kelenn d'al liseidi ha lakaat war-wel penaos e vez labouret ganto. Diskouez a reont ez eus bet dibabet produiñ muioc'h, ha stankoc'h atav.



- » Ar sevel chatal stank eo an doare a vez kelennet ar muiañ e atantoù al liseoù labour-douar.
- » 81% eus ar skolidi el liseoù labour-douar a zo e skolioù prevez. Met ar gelennerien eno a zo an hanter muioc'h stummet war an agroekologiezh evit ar re e skolioù publik.
- » N'eo ket bet graet gant Renerezh-rannvro ar boued, al labour-douar hag ar c'hoadeier ar steuñv goulennet gant ar ministrerezh evit ar prantad 2020-2024.

Mont a ra ar saout da vezañ goroet o-unan. Ur robot eo a raskl ar c'haoc'h-saout war al leur. Al lodennoù maiz ha soja a vez lakaet er milimetr resis ma rankont bezañ... A-us d'ar c'hraou ez eus un dek den bennak o sellet ouzh 150 buoc'h-laezh Holstein hag ouzh ar mekani-koù. Deuet int da weladenniñ al lise da vare dorioù digor an nevez-hañv 2025. Degemer mat deoc'h en atant laezh al lise labour-douar prevez La Touche (866 lisead), e Ploermael (56).

An atant-se a vez lakaet war-wel gant renerien al lise. Danvez pedagogel a vez roet gantañ d'al liseidi a vez eno bemdez evit pleustriñ hag evit sikour d'ar c'hopridi da vagañ al loened ha d'ober war o zro, hag evit labourat er parkeier. E mod-se e vez desket el lodenn vrasañ eus al liseoù labour-douar e Breizh, pa vefent publik pe brevez.

## **AL LABOUR-DOUAR O TONT : STANK HA GANT ROBOTOU**

Fier a-walc'h eo penn an atant da ginnig e diegezh d'un nebeud kerent asambles gant o bugale a c'hellfe mont da liseidi : « 150 buoc'h-laezh a vez savet ganeomp, pa 'z eo 80 ar geidenn e tiez-feurm Frañs. An hanter brasoc'h eget ar

re all omp, kazimant. War-zu an dra-se ez eer dre vras, evit kaout un optimum eko-nomikel, ha peurbaeañ an arc'hant pos-tet gant kementadoù brasoc'h. Ma vije bet 60 buoc'h ganeomp nemetken, n'hon dije ket diskouezet ar pezh a c'hoarvez war an dachenn. »

Bezañ ampletus, diskouez penaos e vo « labour-douar an amzer-da-zont », desachañ ar re yaouank... sed aze arguzennoù al labourer-douar a zo e penn an atant el lise La Touche. Ar memes traoù 'vez klevet eus tu al lise labour-douar prevez Pommerit<sup>1</sup> (796 skoliad) e Peurid-ar-Roc'h (22, e kumun Roc'h-ar-Yeodi abaoe 2019).

Ur robot-goro<sup>2</sup> a zo en atant-laezh eno ivez. An daou lise labour-douar brasañ eo e Breizh ha sklaer eo an traoù ganto. Moc'h a vez savet ezdouar en daou anezho ivez. Da Evel'up (lise La Touche), pe d'ar c'hCooperl (lise Pommerit) e vez gwerzhet ar moc'h-kig ganto, an div gevelouri save-rien-moc'h vrasañ a zo e Frañs. Diaes e vefe soñjal emañ an agroekologiezh e programmoù liseoù al labour-douar.

## **UN DAKENNIG AGROEKOLOGIEZH ER PROGRAMM**

Ar c'hevredigezhioù n'o deus ket soñj anezhañ evit an diardennoù

1] « Données générales sur les effectifs en formation initiale dans l'Enseignement agricole breton - rentrée 2024 », lec'hienn Draaf Bretagne, 27 a viz Genver 2025, pajenn internet bet gwelet e miz Genver 2026

2] Post « Découvrez le pôle laitier du Lycée Pommerit », Kont Facebook AgriBretagne, d'an 11 a viz Du 2020, bet gwelet e miz Genver 2026



Atelier Lugas

bet kemeret gantañ evit an endro<sup>3</sup>. Stéphane Le Foll, bet ministr al labour-douar pa oa prezidant François Hollande, en deus lakaet an traoù da cheñch er speredoù, avat, pa oa e penn ar ministrerezh. E 2012 en doa lañset ar Steuñv Kelenn penaos produiñ e mod all<sup>4</sup>, a zo e bal lakaat an agroekologiezh da vezañ kelennet en holl liseoù a zo dindan kiriegezh e vinistrerezh.

**« P'en doa divizet  
Le Foll lakaat  
ekologiezh er  
programmoù e voe  
freuz ha reuz er  
ministrerezh. »**

*« P'en doa divizet Le Foll lakaat ekologiezh er programmoù e voe freuz ha reuz er ministrerezh, eme André Quillivere,*

*bet enseller e kelenn al labour-douar. Lod eus ar gargidi a glasse gorrekaat ar cheñchamant. Dalc'hus e oa bet penn ar c'habined. Pemp bloavezh en doa labouret evit ma vefe graet. En entremar e*

*chome kalz a ijinourien evit ar cheñchamantoù ekologel, ha war an dachenn e oa tud a harze outañ, d'ar mare-hont dija.*

3] « M. Le Foll parle d'agro-écologie, mais il promeut l'agriculture industrielle ! », Strollad kevredigezhioù al labourerien-douar hag an endro, Reporterre, 21 a viz Meurzh 2014, pajenn internet bet gwelet e miz Genver 2026

4] « Former aux transition », Teul skoazell - Ensellerezh ar c'helenn labour-douar, Ministrerezh al labour-douar, miz Kerzu 2024

*Er sindikad brasañ e oa ivez (an FNSEA, NGAS). »*

Dek vloaz war-lerc'h eo cheñchet an doare da gelenn gant al lañs bet roet evit ma vefe anv eus « *delc'her an danvezioù naturel* » el labour-douar. Produiñ muioc'h atav a oa pal ar c'helenn betek-hen. Deuet eo an agroekologiezh d'ober e doull er programmoù. El liseoù publik, atantoù 'zo o deus cheñchet o doareoù d'ober : nebeutoc'h a demz hag a louzoù kimiek a vez implijet gant lod. Lod all o deus plantet girzhier, pe kemeret diarbennoù labour-douar hag endro (MAE) all. Broudet eo bet an atantoù da sevel atalieroù bio gant ar ministrerezh. « *Biskoazh n'hon dije soñjet er bio a-raok* », eme André Quillivere. 22 % eus gorread hollek atantoù al liseoù publik<sup>5</sup> a oa bio e 2018.

Mont a ra an traoù war an tu mat, neuze... el liseoù publik. Rak chomet eo al liseoù labour-douar prevez war-lerc'h pa vez anv eus kelenn penaos produiñ e mod all. 2.600 kelenner eus al liseoù publik a zo bet stummet war ar cheñchamant doare da broduiñ hag an agroekologiezh abaoe 2020. An hanter nebeutoc'h e oa eus tu ar

prevez. N'eo ket kalz, pa ouzer ez a 80 % eus 15.518 lisead breizhat ar c'helenn labour-douar d'ul lise prevez<sup>6</sup> (distro-skol 2024).

## ATANTOÙ STANK NA ROONT KET AR SKOUER VAT

E Kesoue (22) emeur e-kreiz un Diazad doureier bezhin glas, tost-tost eus bae Sant-Brieg. 524 lisead a studi en ur maner kozh deuet da lise labour-douar abaoe 1950. N'eus robot ebet evit goro saout al lise La Ville Davy. Met « *en soñj robotekaat emamp e*

*penn-kentañ ar bloavezh 2026* », eme buan ar goprad a zo e penn an atant. N'eus nemet perzhioù mat d'ar robot, emezañ : « *kavout ar c'hudennoù yec'hed abretoc'h gant an naouegezh artifisiel, aozañ al labour aesoc'h, tennañ bec'h a-ziwar hor c'horfoù...* »

Ur choaz a-seurt-se a dalvez chom er sistem labour-douar stank ha kustum, gant louzoù kimiek, postañ kalz arc'hant ha produiñ kalz. Ar patrom ekonomikel-se n'eo ket an hini gwellañ, hervez ensellerezh ar c'helenn labour-douar.

En un danevell bet embannet<sup>7</sup> e 2023 e skrive an ensellerezh ne oa nemet 54

**22 % eus gorread hollek atantoù al liseoù publik a oa bio e 2018.**

5] « Bilan 2014-2018 du plan Enseigner à produire autrement », Ministrerezh al labour-douar, miz Genver 2019

6] « Données statistiques sur l'enseignement agricole en Bretagne Rentrée 2024 – Données au 1<sup>er</sup> octobre 2024 », Draaf, miz Kerzu 2024

7] « Exploitations et ateliers technologiques : étude sur les enseignements à tirer des exploitations et ateliers technologiques qui assurent leur équilibre financier », Danevell R23 003, Inspekterezh ar c'helenn labour-douar, miz Du 2023

diouzh an 228 atant e liseoù labour-douar Frañs a oa kempouez o c'hontoù. E Breizh ne oa nemet unan : kreizenn varc'hegezh al lise publik Kernilien e Gwengamp (22).

E-touez erbedoù pouezusañ an danevell e kaver : « *mont war-zu an emrenerezh, par ma c'heller, evit ar produiñ kig dreist-holl, o tigreksiñ an temz hag al louzoù implijet evit paouez da vezañ e dalc'h diouto* ». En un danevell all, bet embannet<sup>8</sup> e 2017, an ensellerezh a ziskoueze gant sifroù e oa an atantoù ampletusañ ar re lec'h ma veze ar saout o peuriñ an aliesañ.

Bernard David, rener kozh al lise La Ville Davy, a zispleg en deus klas-ket cheñch an atant evit ma vije muioc'h emren ha padus. Pa voe rener e voe kaset labourioù modernaat da benn – gant sikour Rannvro Breizh – hag ar geot a oa deuet d'ober 70 % eus boued ar saout, pa oa 20 % a-raok.

Evit chom hep postañ kalz arc'hant er mekanikoù e oa deuet an atant da vezañ ezel eus ur c'hCUMA (ur gevredigezh a servij da meur a di-feurm da gaout mekanikoù labour-douar boutin). Met seurt strivoù ne badont ket atav. Nebeut goude ma voe aet kuit Bernard David eus al lise « *e voe titlet un den all da vezañ e penn an atant. Kentañ tra en doa graet*

# 54 diouzh an 228 atant e liseoù la- bour-douar Frañs a zo kempouez o c'hontoù.

*a voe postañ 500.000 € en un traktour », emezañ.*

Levezonet e vez al liseidi gant an atantoù stank ha robotekaet a zeskont enno, a gav da vJeanne<sup>9</sup>, kelenner war ar merañ en ul lise labour-douar prevez eus kreiz Breizh. Hen gwelet en doa p'en doa lakaet liseidi da dre-men arnodenn dre gomz ar vache-louriezh : « *Pemp kinnig diwar-benn ar robotoù-goro 'm oa klevet en un devezh [Al liseidi eo a zibab danvez o freze-genn, NGAS] ! Padal eo spontus efedoù an doareoù-se d'ober war an endro : ar saout n'ez eont ket er-maez ken, bouetaet 'vezont gant maiz drailhet...* »

8] « Analyse de la situation économique et financière des exploitations agricoles et ateliers technologiques, approche pluriannuelle. Examens approfondis pour les exploitations laitières et horticoles », Danevell R17 009, ensellerezh ar c'helenn labour-douar, miz Gwengolo 2017

9]An dud anavezet dre o anv-bihan hepken a zo bet dizanvet



## AL LABOUR-DOUAR BIO, MOD AR BEIZANTED : ARABAT MONT RE BELL

« Ar sevel chatal stank eo an doare a vez kelennet ar muiañ memes tra, e kalz liseoù, publik ha prevez », eme André Quillivere. « E-touez an dud a-vicher e harzer kalz ouzh ar pezh a aliomp », eme an enseller kozh, a oa bet rener al lise Le Gros Chêne, e Pondi, e 2024 ivez. Al labour-douar biologel, eus e du, a zo bihan-tre e blas. Evel e lise an Nivot (29). Unan eus labourerien an atant a oa hegaset pa lavare didro : « Ar ruskennoù bio, amañ, n'eo nemet un draig ouzhpenn ! »

E lise publik Bréhoulou, e Fouenant (29), e vez gwerzhet pennoù-yar kig gant ar strollad produerien Les

Fermiers de l'Argoat. Lakaet e oant bet da vezañ bio e 2017. Met abaoe 2021 n'int ket mui. « N'eo ket un di-bab hon eus graet, met ar marc'had en deus cheñchet trumm », a zispleg renerien al lise. Gant al Label Rouge e vez gwerzhet ar c'hig bremañ.

E Breizh a-bezh ne gaver nemet daou lise o deus lakaet o atant da vezañ bio : al lise Sucinio e Montroulez (29) evit ar gounid legumaj, hag al lise Théodore-Monod, e Reuz (35), lec'h ma vez gounezet legumaj, savet saout-laezh ha moc'h. Liseoù publik int o-daou.

Ha memes el liseoù-se e chom ar sevel chatal gant ur sistem ma zepand diouzh embregerezhioù all. E lise Reuz e labour an atalier sevel moc'h gant ur gevelouri viologel a ra gant ur

rouedad hir. « *Prenet e vez boued ar moc'h, ne vez ket produet en atant. N'heller ket lavar emaoomp gant an doareoù vertuzusañ a zo* », eme zDominique Blivet, kelenner el lise ha mouezh aotreet ar sindikad Sud Rural Territoires.

## GLASAAT WAR-C'HORRE

Ne ra ket berzh al label « *labour-douar*

*biologel* » rak unan all a zo bet savet gant ministrerezh al labour-douar. Al label HVE (talvoudegezh uhel evit an endro) a vez dibabet gant kalz tud a-vicher, ha 52 % eus an atantoù el li-seoù<sup>10</sup>, e 2022. « *Touellus* » e vefe, avat, hervez ar FNAB<sup>11</sup> (kevredad broadel al labour-douar biologel) hag an UFC-Que Choisir.

« *Greenwashing* » e vefe, zoken, hervez Philippe Cousinie, animatour broadel evit « *Mont war-zu an agroekologiezh er c'helenn labour-douar* ». « *N'eus redi ebet, n'eus striv ebet d'ober evit hon atantoù.* » Gant al label e rank an tiez-feurm kaout 4 % a « *zanframmoù ekologel* »

# Al label HVE : « Green- washing » eo, peogwir « N'eus redi ebet, n'eus striv ebet ».

(girzhier, pradoù...). Un dregantad izel a vez tizhet e pep lec'h dija.

Pell 'zo e c'houlenn ar FNAB e vije lakaet eurvezhioù evit kelenn al labour-douar biologel er programmoù. Ur c'hinnigevit mont war an tu-se a voe kinniget gant ar strollad « *Insoumis* » pa voe votet lezenn heñchañ al labour-douar, d'ar 24 a viz Meurzh 2025. Ne voe ket dalc'het o c'hinnig<sup>12</sup>. Evit poent « *ne vez ket resisaet [er programmoù] pegeit e ranker kelenn an agroekologiezh, ne vez ket termenet resis petra eo na peseurt doareoù d'ober a ya e-barzh. Se 'zo kaoz e vez diaes-tre d'ar gelennerien ha d'ar c'helennerezed perc'hennañ*

10] « Résultats de l'enquête nationale Ecophyto 2024 et perspectives pour 2025 », Philippe Cousinié, Ministrerezh al Labour-douar, miz Even 2025

11] « Le label HVE trompe le consommateur, la Justice doit l'interdire », Lec'hienn Fnab, 23 a viz Genver 2023, pajenn bet gwelet e miz Genver 2026

12] « Amendement n°853 rejeté concernant l'article n°2 de la loi d'Orientation pour la souveraineté en matière agricole et renouvellement des générations en agriculture n° 2600 », lec'hienn ar Vodadenn Vroadel, 7 a viz Mae 2024, pajenn bet gwelet e miz Genver 2026

ar mennozh-se », a skriv kevredigezh al labour-douar biologel.

« Distrempet » eo an agroekologiezh, pe ar cheñchamant doare d'ober, er programmoù dre vras. Gant se e c'heller chom hep ober anv anezho.

« Evidon-me n'heller ket cheñch sistem na mont war-zu an agroekologiezh ma ne vezer ket engouestlet, eme Philippe Cousinie. Ma sav ar gelennerien a-enep d'al labour-douar bio, ne lakint ket kalz a youl evit komz eus an tem-se. » Lod eus ar gelennerien hag eus ar skipailhoù n'int ket « engouestlet » evit komz eus an agroekologiezh. Met lod all a zo nec'het, dreist-holl.

**« Ma sav ar  
gelennerien  
a-enep d'al labour-  
douar bio, ne  
lakint ket kalz a  
youl evit komz eus  
an tem-se. »**

## KELENNERIE NEC'HET

« Lod eus ar gelennerien ne gredont ket mui. Klasket o deus, merzhetao deus e oa arvarus an tem ha ne fell ket dezho klasken », eme c'hGaëtan Bourdon, kelenner war an aozañ hag an endro el lise prevez Kerlebost.

Emañ al liseidi o tont eus bed al labour-douar, barrek-tre int war an teknikoù labour-douar ha traoù resis a c'hortozont deskiñ diwar-benn al labour-douar stank. Lod eus ar gelennerien en em gav diaes dirazo. « Al liseidi a c'hortoze kaout traoù diwar-benn ul labour-douar modern-tre gant

teknologiezhioù e-leizh, ha me, ispisializet ma 'z on war an agroekologiezh kentoc'h, en em gaven pell eus an traoù 'felle dezho », a zispleg Geneviève Sagare, kelenner e lise Pommerit, ijinourer agronomour.

Lod eus al liseidi a sav a-enep d'an agroekologiezh. « Al lodenn vrasañ anezho a zo a-enep d'ar bio forzh penaos », eme Marie Cadou, kelenner e Kernilien (Gwengamp, 22). Kavout

a ra dezho emañ al labour-douar bio e dalc'h al lobby ekologel, hag e vez ma- get an « agri-bashing ganto ».

Gant an FNSEA, sindikad pennañ al labourerien-douar, e vez graet gant teorienn

an agri-bashing. Hervezo e vefe komzet fall eus al labourerien-douar dizehan. Degemeret e oa bet an deorienn-se dreist-holl gant Ministrerezh an Diabarzh pa oa bet krouet gantañ arsellvaoù an agri-bashing e 2019. Hervez ar gazetenn *Le Monde* eo bet diskouezet e oa « bevennet-tre, pe zoken dizoloet » an « argadennoù ideologel »<sup>13</sup>, war bed al labour-douar.

« Diouzhtu pa glevez ar ger ekologiezh e c'hellez klevout chouadennoù a bep tu. Teurel a ran evezh, klask a ran farsal hag atizañ anezho un tamm », eme Dominique Blivet. Jeanne a gont

13] « L'« agribashing », un élément de langage endossé par les pouvoirs publics pour un phénomène quasi introuvable », Antoine Albertini, Stéphane Foucart, *Le Monde*, 27 a viz Du 2024, pajenn web bet gwelet e miz Genver 2026

deomp ivez e santer e vez soutenet industriezh ar boued gant al liseidi el lise prevez ma vez o labourat ennañ : « *Pa reer anv eus ar bio e vez klevet lod o skrignal.* » N'eus ket kalz a liseidi a gred lavar int dedennet gant al labour-douar biologet. « *Ul liseadez a guzhe da vat e oa he zud e labour-douar bio hag oberiant-tre e rouedadoù ar beizanted !* »

### PELEC'H EMAÑ AN DRAAF ?

Unan eus palioù nevez ar c'helenn labour-douar eo deskiñ d'ar skoli-di penaos produiñ e mod all, avat. Termenet e vez el lezenn heñchañ al labour-douar<sup>14</sup> bet votet e miz Meurzh 2025 : « *Diorren ar gouiziegezhioù hag ar barregezhioù diwar-benn an treuzkemmoù hin hag endro.* »

E raktres lakaat al lezenn-se da dalvezout emañ ar Ministrerezh o reiñ lañs d'ur programm nevez evit kelenn doareoù produiñ all, hag a vo lakaet e pleustr e miz Kerzu 2026. Pouezañ a ra ar programm war roll ar feurmoù, a rank dont da vezañ « *diskouezerien ar cheñchamantoù* ». Koulskoude, e Breizh, n'eo ket efedus lakaat da dalvezout ha heuliañ ar c'helenn agroekologet.

Dindan kiriegezh ministrerezh al labour-douar emañ al liseoù labour-douar. Er rannvroioù eo Renerezh-rannvro ar boued, al labour-douar hag ar c'hoadeier (Draaf) a

# « Al lodenn vrasañ anezho a zo a-enep d'ar bio forzh penaos. »

vez a-us dezho, neuze. Ar renerezh-se eo a zo karget da aozañ ha da heuliañ kelenn an agroekologiezh abaoe 2014.

Un ostilh da vezañ kensavet gant al liseoù en deus ar renerezh evit se : ar Steuñv rannvroel kelenn penaos produiñ e mod all. Gant an destenn-se e c'hell pep lise lakaat palioù da vezañ tizhet war 4 bloaz evit an treuzkemmoù hag an agroekologiezh.

E 2020 en doa goulennet ar ministrerezh lañsañ al labour evit ober ur steuñv nevez. An Draaf Breizh n'he deus graet, avat. Ar renerezh en deus kelaouet ac'hanomp e oa chomet an destenn-se « *er stad a raktres abaoe 2020* » ha « *ne oa ket bet embannet* ». Nac'het en deus an ensavadur respont d'hor goulennoù.

14] « La loi d'orientation pour la souveraineté alimentaire et le renouvellement des générations en agriculture entre en vigueur », Lec'hienn Ministrerezh al Labour-douar, 22 a viz Ebrel 2025, pajenn bet gwelet e miz Genver 2026

Padal e ranker kaout kalz a youl bolitikel evit kas al labour war-raok en ur chanter evel hennzh. Diaes e oa bet lakaat al liseoù prevez da gemer perzh kement hag en doa graet al liseoù publik evit ar steuñv a-raok<sup>15</sup>, bet lañset e 2014, a skrive an DRAAF dija, d'ar mare-se.

Met n'eus ket anv eus un teul da skrivañ nemetken. Petra a zo e-barzh, ha penaos e teu da wir ? Penaos lakaat anezhañ war ober pa n'eus den ebet e karg eus an treuzkemmoù el lodenn vrasañ eus al liseoù prevez ? Pa n'eus eur-vezh ebet gouestlet d'ar programm-se ? N'eus nemet el lise Kerlebost ez eus bet anvet un den e-karg, Gaëtan Bourdon, ha roet un hanter-devezh bep sizhun dezhañ da labourat. « Pa oan kroget 'm boa lavaret : "A-walc'h gant an taolennoù Excel, bremañ 'vo graet traoù" », eme ar c'helenner. Lañset en deus ur programm evit plantañ girzhier ha gwareziñ ar re a oa anezho dija. Meur a ober a zo deuet da wir gantañ diwar-benn ar

**« Hor mod da broduiñ a gлот gant ar pezh a vez graet hag ar pezh a vez gortozet gant an dud, d'hor soñj. »**

vevliesseurted pe digreskiñ implij al louzoù kimiek.

Eilrener al lise La Touche e Ploermael a zo e karg eus ar C'helenn penaos produiñ e mod all. Goude dek vloaz a steuñvoù e anzav ez eo « *cheñch ar c'hlogorennoù da lakaat LED* » ha « *ki-zidikaat al liseidi evit nompas foranañ boued er c'hantin* » an traoù nevesañ bet graet ganto.

« *Treiñ ul lodenn eus an douaroù war-zu al labour-douar biologel* » a oa pal pennañ al lise hervez e steuñv Produiñ e mod all evit 2020-2024. En un daolenn rakselloù e kinnig an teul tizhout « 100 % e 2025 » zoken. Pemp bloavezh goude n'eus hini ebet eus atalieroù an atant e labour-douar biologel. « *Kaout un atalier bio evit ober brav ne dalvez*

*mann ebet, ha pa weler marc'had al labour-douar bio hiziv n'eo ket aes kempouezañ. Hor mod da broduiñ a gлот gant ar pezh a vez graet hag ar pezh a vez gortozet gant an dud, d'hor soñj* », eme an isrener.

**Chloé Richard, Faustine Sternberg**

15] « Le projet régional « enseigner à produire autrement » (PREPA) : une démarche collective de tous les établissements d'enseignement agricole de Bretagne », Draaf Breizh

## Boest Du

Evit teuliañ hor pennad diwar-benn an agroekologiezh e programm al liseoù labour-douar hon eus lennet ar Steuñv Kelenn penaos produiñ e mod all, 2016-2020 enlinenn war lec'hienn Renerezh-rannvro ar boued, al labour-douar hag ar c'hoadeier (Draaf).

Goulenn a reomp digant Draaf Breizh ar Steuñv-rannvro evit ar prantad 2020-2024, ha ne oa ket bet kavet enlinenn. An Draaf Breizh he deus ke-laouet ac'hanomp e oa an teul e « stumm raktres » abaoe 2020. Goulenn a reomp digant ar bodad evit an diraez d'an teulioù melestradurel (Cada). A-du eo savet ar c'hCADA gant hor goulenn. Skrivet eo bet mod sklaer gant ar c'hCADA e oa « *en teulioù melestradurel (...) teulioù, danevelloù, studiadennoù, munudoù, skridoù, stadegoù, titouroù, kemennadennoù, notennoù ha respontoù ministrel, lizhiri, mennozhioù, rakweledennoù, kodoù tarzha ha divizoù* ».

A-hed hon enklask hon eus kinniget d'ar Servij Rannvro ar Stummañ hag an Diorren, ur servij eus an Draaf Breizh, kaozeal ganeomp dre gomz. Ne deus ket respontet. Klasket hon eus ivez mont e darempred dre bostel pe dre bellgomz gant Ensellerezh an Deskadurezh Labour-douar, a ra war-dro Ministrerezh al Labour-douar, met n'hon eus resevet respont ebet d'hor goulennoù.

Ur gudenn vras eo ne vije ket posupl kaozeal gant ensavadurioù publik diwar benn sujedoù a laz hollek ha diwar-benn politikerezhioù arc'han-taouet gant arc'hant publik.



## ARC'HANT PUBLIK A YA D'AL LISEOÙ LABOUR-DOUAR PREVEZ

Tri milion a euroioù hag hanter-kant. Setu ar sammad a skoaziadennoù diret bet roet d'al liseoù labour-douar prevez gant Rannvro Breizh abaoe dek vloaz. Brokus ar skoazelloù-se pa vez mestr al liseoù prevez war kelenn al labour-douar. Eus tu al liseoù publik e ra diouer an arc'hant. Diaes eo dezho desachañ skolidi ha mont war-raok gant o labour.



Atelier Lugas

- » E-keit ha ma vez roet milionoù a euroioù er gennad prevez e vez diaes da liseoù labour-douar publik Breizh arc'hantaouiñ labourioù ret.
- » Linnennoù karr-boutin prevez o deus an daou lise-se, tra ma vez diouzh ar c'hirri-boutin rannvroel al liseoù publik
- » Displegañ a ra Rannvro Breizh he skoazell vras d'al liseoù prevez ha d'an tiez ar familhoù a-ziwar ar maez gant he c'hoant da dizhout pal 1 000 labourer-douar staliet bep bloaz.

Rannvro Breizh a c'heller finiañ enni evit skoazell al liseoù labour-douar prevez : 511.000 € evit diskar ha ne-veziñ savadurioù amañ ; 243.000 € evit sikour ul lise da bostañ arc'hant e madoù diloc'h ahont ; 66.000 € evit cheñch dorioù ha prenestroù, adlivañ ur savadur ha mogerioù ar salioù-debriñ ; pec'hoazh 63.600 € evit prenañ dafar pedagogel.

80 % eus skolidi ar c'helenn labour-douar a ya d'ur skol brevez e tachenn Breizh 4 departamant<sup>1</sup>. E 2024 e oa 9.221 skoliad el liseoù prevez, da lavaret eo 60 % eus hollad ar skolidi er c'helenn labour-douar. 22 % a oa en MFRoù, pe TFMoù (Tiez ar familhoù a-ziwar ar maez) ha 18 % el liseoù publik.

Plas pennañ ar gennad prevez a zo hir en istor an deskadurezh e Breizh. Bremañ e vez sikouret kalz gant ar Rannvro : Breizh eo ar rannvro vrokusañ gant an deskadurezh prevez dre lisead e Frañs, hervez *Mediapart*<sup>2</sup>. Ha diaes eo d'al liseoù publik desachañ skolidi.

## 53 MILION A EUROIOÙ A SKOAZIADENNOÙ DIRET EVIT AL LISEOÙ PREVEZ

28 skol<sup>3</sup> a oa ezel eus rouedad al liseoù labour-douar prevez (CNEAP) e Breizh e miz Here 2024.

*Splann !* en deus studiet taolennoù skoaziadennoù ar Rannvro. Titouroù publik<sup>4</sup> eo a c'hell bezañ lennet gant pep hini. Sed ar pezh hon eus jedet : 53 milion a euroioù a skoaziadennoù diret a zo bet roet da liseoù ar c'hCNEAP e dek vloaz, da lavaret eo 5.800 € dre skoliad. Barrek eo ar Rannvro hervez lezenn evit merañ al liseoù publik. Met n'he deus redi ebet da reiñ arc'hant d'al liseoù prevez. Un dibab eo eus o zu, neuze. Ouzhpenn da se eo start ar jeu gant al liseoù publik, ar pezh n'eo ket gwir evit ar re brevez. E-pad an 10 vloaz<sup>5</sup> tremenet eo digresket an niver a skolidi er c'helenn labour-douar dre vras (6,1 % ne-beutoc'h el liseoù publik, 5,73 % evit ar c'hCNEAP hag an MFRoù). Abaoe 2022 e kresk an niver-se en-dro el liseoù prevez, eus 12.230 skoliad da 12.560 e 2024. Ne ra ket el liseoù

1] « Données générales sur les effectifs en formation initiale dans l'Enseignement agricole breton », Draaf Bretagne-SRFD/CGasti-Bianchi/VA 271224, miz Kerzu 2024

2] « Lycées privés : révélations sur une rallonge de 1,2 milliard d'euros d'argent public », Bérénice Gabriel, Mathilde Goanec, Donatien Huet, Manuel Magrez, Mathilde Mathieu, David Perrotin, *Mediapart*, 26 a viz Eost 2024, pajenn bet gwelet e miz Genver 2026

3] « Données générales sur les effectifs en formation initiale dans l'Enseignement agricole breton », Draaf Bretagne-SRFD/CGasti-Bianchi/VA 271224, miz Kerzu 2024

4] « Les subventions attribuées depuis 2014 », lec'hienn Rannvro Breizh, pajenn bet gwelet e miz Genver 2026

5] « Données générales sur les effectifs en formation initiale dans l'Enseignement agricole breton », Draaf Bretagne-SRFD/CGasti-Bianchi/VA 271224, miz Kerzu 2024

publik nag en MFRoù, avat. Ne vez skoliataet nemet 18 % eus skolidi ar c'helenn labour-douar el liseoù publik, met en o zouez e kaver 41 % eus<sup>6</sup> « *ar skolidi o prientiñ un diplom a ro an aotre d'en em staliañ* » : da lavaret eo al live deskadurezh ret evit bezañ e penn un atant, kaout sikourioù arc'hant ha kaout douaroù aesoc'h.

Kaset hon eus goulennoù d'ar Rannvro diwar-benn he sikourioù d'al liseoù prevez, gant disoc'hoù hor jedadennoù war 10 vloaz. N'hon eus bet respont resis ebet, met tud ar Rannvro o deus roet ar sifr a 61 milion a euroioù dispi-gnet evit al liseoù publik etre 2018 ha 2024. Resisaet o deus e oa bet roet « 42,7 milion a euroioù d'ar gennad prevez (CNEAP ha MFR) er memes mare. »

Met lodenn ar skoa-  
ziadennoù a c'hell  
bezañ kalz uheloc'h  
e liseoù 'zo.

Da lise Pommerit  
(Aodoù-an-Arvor)  
ez eus bet roet en

tu all da 8 milion a euroioù gant ar Rannvro etre 2014 ha 2024, da lava-  
ret eo war-dro 10.400 € dre lisead.  
An eil brasañ eo e-touez al liseoù  
labour-douar prevez e Breizh (774  
skoliad). Danielle Even, ezelez eus  
an FNSEA ha prezidantez kozh ar ge-  
vredigezh Agriculteurs de Bretagne  
(2014-2022) eo prezidantez al lise.

1,6 milion a euroioù en deus bet al  
lise Saint-Yves e Gourin (56) digant ar

Rannvro e-pad an dek vloaz paseet.  
191 lisead a zo skoliataet ennañ, ar  
pezh a lak ar sammad roet dre skoliad  
da 8.650 €. Evit al lise Issat e Redon  
(Il-ha-Gwilen) hag e 576 skoliad ez eo  
10.200 € a zo bet roet dre lisead war  
10 vloaz.

## **UR GOÑVAÑSION SINET GANT KEVREDAD AL LISEOÙ LABOUR-DOUAR KATOLIK WAR-EEUN**

N'eus redi ebet d'ar Rannvro da reiñ  
arc'hant d'al liseoù prevez. Met ur  
goñvañsion he doa sinet gant ar  
c'hCNEAP evit ar bloavezhioù 2018  
da 2023 : enni e tivize ar Rannvro reiñ  
4,3 milion a euroioù d'al liseoù-se bep  
bloaz. Etre 2018 ha 2022 e ranker

ouzhpennañ ar sam-  
mad a 6,5 milion a  
euroioù a vo lakaet  
evit atantoù an holl  
liseoù labour-douar  
(publik ha pre-  
vez) gant kevratoù

**Reiñ a ra ar Rannvro  
ur skoazell vras d'al  
liseoù labour-douar  
prevez : 5 800 euro  
dre skoliad.**

« *emrenerezh hag araokaat* ».

4,5 milion a euroioù a vo gouestlet  
gant ar Rannvro da souten liseoù ar  
c'hCNEAP etre 2024 ha 2028, hervez  
ar goñvañsion nevez. E 2025 e voe ad-  
welet ar goñvañsion ha digresket ar  
skoaziadenn da 3,5 milion a euroioù  
bep bloaz. Nac'het o deus dilennidi ar  
Rannvro eskemm diwar-benn an tem-  
se ganeomp e-pad ar mizvezhioù tre-  
menet, daoust deomp bezañ goulennet

6] « Plan d'actions en faveur de l'attractivité des lycées agricoles publics de Bretagne 2024-2029 », Divizad niv. 23\_DGEOFE\_01, Kuzul-rannvro Breizh, miz Kerzu 2023

# « E lise Suscinio (Penn-ar-Bed) e azasaomp an im- plij-amzer ouzh eurioù ar bus. »

ganto ober meur a wech. Respontet o deus dre skrid d'ul lodenn eus hor goulennoù. Skrivet o deus deomp e oa bet « *divizet gant Rannvro Breizh adwelet ar sammad nevez-zo, rak redioù budjedel strizh a vez lakaet dezhi* ».

A-wechoù n'eo ket gwall zisheñvel ar sammadoù resevet gant lod eus al liseoù publik diouzh ar re o deus bet liseoù prevez 'zo. 30.450 € en deus bet lise publik Mené e Medrigneg (22) evit pep skoliad etre 2014 ha 2024. Met n'eo ket gwir evit lise Bréhoulou, e Fouenant (29). Evit e 305 lisead en deus resevet ur sammad a 11.985 € evit pep hini. Saint-Jean Brévelay, gant e liseoù en Henbont hag e Pondi (56)

en deus bet 14.063 € dre skoliad, eus e du. « *Bréhoulou en deus bet hon asant evit postañ arc'hant en e graou-moc'h evit ar sammad a 1.660.000 €* » e 2024, he deus meneget ar Rannvro deomp.

Meur a zoare skoaziadenn a zo : sikourioù evit prenañ ostilhoù ha dilhad labour evit al liseidi nevez, sikourioù evit prenañ urzhiataerioù, dafar pedagogel pe evit aveiñ an atantoù.

Ar Rannvro a sikour al liseoù evit labourioù surentez pe neveziñ. Da lise Pommerit ez eus bet roet 1,2 milion a eurioù ganti e 2023 evit sevel ur savadur a servij da lojañ an deskarded.

Treuziadoù pedagogel a zo evit

an atantoù ivez, hag ur sikour, anvet Karta<sup>7</sup>, evit ar raktresoù pedagogel.

Abaoe 2018 e vez roet 50.000 € a skoaziadenn da skourr Breizh ar c'hCNEAP bep bloaz evit ur « *skoazell deknikel evit tresañ teulioù goulenn labourioù hag aveladurioù ar rouedad CNEAP Bretagne* ».


## **LINENNOÙ KARR-BOUTIN PREVEZ EVIT AL LISEOÙ PREVEZ**

Diaes eo kompren e vefe ken bras ar sikourioù pa n'eo ket reizh an traoù etre al liseoù prevez ha publik. Meur a zoare o deus ar re gentañ da vezañ arc'han-taouet, ha gant kerent ar vugale da gentañ, a bae evit skoliata anezho.

7] Fiche « Karta Bretagne Projets éducatifs des lycées », Lec'hienn Rannvro Breizh, pajenn bet gwelet e miz Genver 2026

ETRE 2014 HA 2024 HE DEUS PAET BREIZH DRE VRAS 5 800 EURO DRE SKOLIAD SKOLIATAET EL LISEOÙ LABOUR-DOUAR PREVEZ.

E orañjez, liseoù prevez ar Cneap o kinnig diplomoù anvet «produiñ» hag o reiñ barreezh al labour-douar. E glas, liseoù o kinnig stummadurioù war ar servij d'an den pe ar gwerzh.



En Nivot<sup>8</sup> e Lopereg (29) e koust etre 1.499 ha 1.767 € evit ur bloavezh-skol, hervez al live. E lise Pommerit, lec'h ma vez gwelet liseidi gant tablezennoù ha gwisket gant chupennoù logo al lise merket outo alies, e koust 1.351 € bloavezh-skol ul lisead.

Linennoù karr-boutin prevez o deus an daou lise-se, evel hini La Ville Davy<sup>9</sup>, e Kesoue (22). Koust a ra etre 555 ha 641 € evit ur bloavezh-skol en Nivot, hervez pegen pell emañ ti ar skoliad eus al lise. Evit mont d'al liseoù labour-douar publik er c'hontrol e ranker implij linennoù karr-boutin skol, arc'hantaouet gant ar Rannvro pe ar c'humuniezhoù

kumunioù. N'ez eont ket pell eus al liseoù alies. « *Abalamour d'an treuzdougen e kollomp kalz a liseidi el liseoù labour-douar publik*, eme zDominique Blivet, kelenner ha mouezh aotreet ar sindikad Sud Rural Territoire evit Frañs a-bezh. *E lise Suscinio (Penn-ar-Bed) e azasaomp an implij-amzer ouzh eurioù ar bus. Pell diouzh al lise emañ an ehan, emezañ c'hoazh. Betek nevez-zo e kase Montroulez Kumuniez ar skolidi betek al lise ha ne reont ket mui.* »

Heñvel eo an traoù e Saint-Jean-Brévelay (Mor-Bihan). « *Diwezhat e vez*

*ar skolidi oc'h en em gaout bep Lun* », eme Annaël Morlec, kelenner. « *Ret eo deomp ampellat penn-kentañ ar c'hentelioù. Dre fazi linennoù bus ne glotont ket gant ar pezh hon eus ezhomm da gaout hag un niver re izel a skolidi.* »

Efedusoc'h eo al liseoù prevez ivez pa vez anv eus goulenn ar sammadoù arc'hant dleet dezho evit an taos deskardiñ. Goulennet hon eus gant

Renerezh-rannvro ar boued, al labour-douar hag ar c'hoadeier (Draaf) gouzout pegement e veze resevet gant liseoù labour-douar Breizh dre an taos-se. Nac'het o deus reiñ ar sifroù-se deomp, daoust deomp bezañ

resevet ali a-du<sup>10</sup> ar bodad evit an di-raez d'an teulioù melestradurel (Cada), un aotrouniezh velestradurel a c'hell bezañ seziset gant n'eus forzh piv evit gellout lenn teulioù melestradurel.

## **O C'HORTOZ AR STEUÑV « DEDENNUSTED »**

Pa vez skuilhet milionoù a euroioù war al liseoù prevez e kaver liseoù labour-douar publik na zeuont ket a-benn da arc'hantaouiñ labourioù ret. Enklasket hon eus e-barzh ouzhpenn un hanter eus liseoù publik Breizh. E

8] « Coûts de scolarité collège-lycée 2024-2025 », teuliadoù skol Le Nivot, Lopérec

9] « Transports assurés par La Ville Davy », Lec'hienn La Ville Davy, pajenn bet gwelet e miz Genver 2026

10] Avis n° 20254610, Kuzul evit mont e darempred gant an teulioù melestradurel (CADA), 4 a viz Gwengolo 2025



pep hini anezho e keuzie ar gelennerien rak ne veze ket postet arc’hant a-walc’h el lise. Ar memes tra a veze lavaret gant dilennidi ar sindikadoù evit ar rannvro.

422.000 € he deus postet ar Rannvro e lise Kaon evit atalier laezh an atant. Met « *a-benn daou vloaz e vo klozet ar c’hraou-moc’h. N’eo ket diouzh an normoù ken, tri milion a euroioù ‘vefe dav lakaat evit nevezñ anezhañ. Rannvro Breizh he deus lavaret ne vije ket graet ganti* », eme wGwen Rubeillon, kelenner.

En kreizenn stummañ Kerliver en Hañveg (29) e vez prientet ar Breved micherel penn embregerezh labour-douar (BPREA) gounidigezh legumaj. Met Kerliver a vo serret ivez. Ar Rannvro he deus graet an diviz. Re ger e vefe al labourioù d’ober evit

nevezñ ar savadurioù, emezo. « *Koust a rafe 20 milion a euroioù* », eme zDominique Blivet, kelenner. D’al Lun 10 a viz Du e oa bet o vanifestiñ a-enep<sup>11</sup> d’an diviz-se dirak ar C’huzul-Rannvro, asambles gant kenlabourerien dezhañ. Daoust da se e kav d’ar Rannvro ez eo « *a-bouez perzh [al liseoù labour-douar publik] evit stummañ labourerien-douar ha gopridi da zont en dachenn-se* ». Setu perak en doa votet Kuzul Rannvro Breizh evit ma vije graet ur « *steuñv oberoù evit dedennusted al liseoù labour-douar publik 2024-2029* ». E fin ar blaovezh 2023 e oa.

Dalc’het ez eus bet pemp chanter, a zo sañset da lakaat al liseoù labour-douar publik da vezañ « *dedennusoc’h* ». En o zouez e kaver : « *digeriñ muioc’h ar skolioù d’an holl dud a c’hell bezañ dedennet*

11] Testenioù kelennerien kreizenn stummañ Kerliver dirak Kuzul-rannvro Breizh, video, Splann! lec’hienn, 10 a viz Du 2025, pajenn bet gwelet e miz Genver 2026

gant ar stummadur labour-douar » pe c'hoazh « lakaat ur strategiezh kehentiñ evit dedennusted ar rouedad da dalvezout ». Ar Rannvro n'he deus ket asantet d'hor goulennoù reiñ emgav deomp gant un dilennad evit abegoù « lec'haveiñ ». Met skrivet he deus deomp « d'an deiz a hiziv ez eus bet kroget gant 100 % eus an oberoù. Sturiet int gant ar Rannvro, pe an Draaf, pe an EPLEFPA (evit al liseoù publik), pe ar GIP (strollad a laz foran) BreizhFormagro ».

« Moked eo hepken, eme c'hGaëlle Le Bayon, penn-sekretourez ar sindikad Snetap-FSU. Anat eo ne vez ket anv eus ar steuñv-se el liseoù.

Biken-james. N'eo ket bet kinniget zoken. »

« Ma c'henseurtes n'ou-zont ket ez eus eus ar steuñv-se zoken. Ha bremañ e welomp mat eo techet ar c'huzul rannvro da guitaat anezhañ. Pa oa bet savet, dija, hon oa ranket bountañ evit gelllet kemer perzh e skrivañ anezhañ », emezi ouzhpenn.

E 2025 ez eus bet lañset ur chanter a gousto eizh milion a euroioù e Kaon. Ar Rannvro he deus lakaet deomp da c'houzout e vefe nevezet lodeus ar savadurioù, ar mogerioù diavaez en o zouez. « Sañset e oa al lise da vezañ nevezet da vat e 2017, rak da gentañ e oamp e listenn an traoù d'ober er c'huzul rannvro », eme wGwen Rubeillon, keuz ennañ. « Evit abegoù dezho o-unan o deus kavet gwelloc'h chom hep ober netra e-pad eizh vloaz », emezañ ouzhpenn. Resisaat a ra ar renerezh n'eo ket rakwelet « difuiñ ar

savadur, daoust ma vefe ret ober ».

« Daoust ma ranko lod eus ar sifroù kaout studiadennoù teknik c'hoazh e tizher kazi 20 milion a euroioù etre tout », a skriv ar Rannvro diwar-benn an arc'hant a vo postet el liseoù labour-douar publik.

## **PEDIÑ INDUSTRIEZH AR BOUED DA ARC'HANTAOUIÑ AL LISEOÙ**

Pediñ embregerezhioù da arc'hantaouiñ al liseoù o vezañ « mesened » a zo meneget er raktres rannvroel ivez. Digoret 'vefe an nor da industriezh ar boued, neuze, eme meur a zen e-touez ar re o deus komzet gant Splann ! Annaël

Morlec, da skouer, he deus kemeret perzh e skrivañ ar steuñv-se : « Chifoket e oan bet pa 'm boa gouezet e rankfemp klask kavout mesened », emezi. Jean-Louis

Ollivier, dileuriad ar

sindikad Sud Rural Territoires e lise publik Bréhoulou (Penn-ar-Bed), hen lavar didro ivez : « Techet omp da vont a-enep da gement tra 'rafe anv eus mesenerezh. »

El lise prevez La Ville Davy er c'hontrol emeur en soñj mont war-zu ar mod-se d'en em arc'hantaouiñ. Paouezet eo bet gant ar gevrat « emrenerezh hag araokaat » ha paouezet he deus ar Rannvro gant arc'hantaouiñ atantoù al lise. Ret e vo d'ar skol kavout moneiz da gempouezañ ar c'holl-se.

Hervez ar Rannvro « evit ma vo kavet labour gant al liseidi da heul o stummadur e ranko an embregerezhioù bezañ enframmet muioc'h e strategiezh ar skolioù. Meur a stumm a c'hell kaout kement-se,

**Ur steuñv oberoù  
evit al liseoù  
labour-douar  
publik : « Moked  
eo hepken ».**



Atelier Lugus

mesenerezh ha/pe kevelerezh (klask ha diorren, kinnig stajoù, kemer perzh e prezegennoù, hag all hag all) ». Hag ar strollegezh da bouezañ : « Kevelin gant tud a-vicher a vez graet e skolioù publik labour-douar dija. »

Un ali en doa kaset skourr<sup>12</sup> an FNSEA e Breizh d'ar Rannvro e miz Kerzu 2023, pa voe votet ar steuñv. Laouenaat a rae ar sindikad gant ar raktres-se. Ouzhpennañ a rae memes tra : « youl ar Rannvro omp prest da labourat eviti ivez. Met ne vo ket posupl hep lakaat tout an dud a labour evit ar c'helenn labour-douar e-barzh ar jeu ».

Mizvezhioù goude eo cheñchet mod ar Rannvro da gehentiñ diwar-benn steuñv dedennusted al liseoù labour-douar publik : ar ger « publik » ne

lenner ket mui anezhañ en titloù. Ne vez ket anv ken nemet eus « Dedennusted al liseoù labour-douar. »

Ar goulenn hon eus graet ouzh tud ar Rannvro. Respontet o deus dre bostel : « evit tizhout pal 1 000 labourer-douar staliet bep bloaz e ranko Breizh bezañ harpet war an tri skourr a zo en he rouedad stummañ : al liseoù labour-douar publik, al liseoù labour-douar prevez ha Tiez ar familioù a-ziwar ar maez... ». En ur gemenadenn<sup>13</sup> a c'heller lenn e lec'hienn ar Rannvro e weler ar guzulierez rannvroel Adeline Yon-Berthelot poltredet gant skolajidi o weladenniñ al lise Saint-Ilan, e Langaeg, ul lise... prevez. Kompren a reer gwelloc'h perak, neuze.

**Chloé Richard, Faustine Sternberg**

12]Mennozh ar CESER war danevell ar C'huzul-rannvro « Plan d'actions en faveur de l'attractivité des lycées agricoles publics de Bretagne 2024-2029 », CESER, Miz Kerzu 2023

13] « Attractivité des lycées agricoles : à St-Ilan, une journée « immersion à la ferme » pour 540 élèves des Côtes d'Armor », lec'hienn Rannvro Breizh, 16 a viz Mae 2025, pajenn bet gwelet e miz Genver 2026

## Boest Du

Implijet hon eus roadennoù ar skoaziadennoù a c'heller kavout enlinenn e lec'hienn ar C'huzul Rannvro evit jediñ ar skoaziadennoù roet d'al liseoù gant ar Rannvro. Sifroù 2014 eo ar re goshañ disponiñ. Graet hon eus hollad ar skoaziadennoù evit pep lise prevez evit kavout ar sammad a 53 milion a euroioù.

Evit jediñ ar sammad dre lisead hon eus rannet hollad ar skoaziadennoù roet dre lise dre an niver a skolidi e pep lise. Sifroù an Draaf evit an distro-skol 2024 hon eus implijet. Servij a ra ar jedadenn-se d'al lenner da veizañ gwelloc'h ar c'hementad a skoaziadennoù « ouzhpenn » a vez roet d'al liseoù-se gant ar Rannvro. Kalz uhelloc'h eo ar geidenn e liseoù 'zo. Ouzhpennomp n'eo ket cheñchet kalz an niveroù a liseidi abaoe 10 vloaz (digresk a 6,1 % er gennad publik hag a 5,73 % er gennad prevez).

Goulennataet hon eus ar Rannvro diwar-benn ar skoaziadennoù roet d'al liseoù labour-douar. Setu ar pezh a zo bet respontet deomp : Etre 2018/2024 ez eus bet resevet 61 milion a euroioù gant al liseoù labour-douar publik (evit labourioù hag aveiñ), da lavaret eo « ur feur a 2.867 €/skoliad ». Al liseoù labour-douar prevez (CNEAP ha MFR) o deus resevet 42,7 M€ eus o zu, da lavaret eo « ur feur a 488 €/skoliad ».

N'eo ket bet displeget ar mod da jediñ deomp. Nac'het he deus ar Rannvro leuskel Splann ! da eskemm gant un dilennad war-eeun. N'ouzomp ket perak e vez graet ar jedadenn war 6 bloaz ganto, neuze. N'hon eus ket kavet ar memes sifroù, hag evit nompas koll al lennerien hon eus divizet e vefe meneget ar sammad hollek war 6 bloaz nemetken, ha chomet omp hep menegiñ ar feur dre skoliad jedet gant ar Rannvro e korf ar pennad.

## KAMPUS THE LAND : A-DREUZ EZ A AR RENEREZH HAG AN ARC'HANT

Falloc'h-fallañ ez a an traoù evit The Land, ur strollad skolioù a vrud ur « vuhez nevez war ar maez ». Mont a ra kuit kalz a implijidi, ne vez ket lakaet al liseoù war-wel... Kollet e oa bet ivez 1,2 milion a euroioù gant an embregerezh er bloavezh 2023-2024. Doareoù Jean-Marc Esnault da ren a vez meneget gant meur a hini.



- » Un nebeud devezhioù a-raok an distro-sko, e oa bet klevet gant implijidi The Land e oa 1,2 milion a euroioù kollet, pa oa raktreset er budjed e vije 75 000 euro.
- » Dindan dek vloaz : 72 den en deus kuitaet al liseoù ha pevar ensellet bet graet abaoe an nevezamzer 2025.
- » En em ginnig a ra Jean-Marc Esnault, rener The Land, evel « Oberour, prezegenner, ekonomist, sokiologour » hag « ur vouezh levezonus e tachenn an treuzkemm ekologel ha kevredigezhel ».

**U**l lec'h hep-e-bar, hibrid, ma vez bodet ennañ an deskiñ, ar c'hrouiñ embregerezhioù, an neveziñ, ar sevenadur hag ar preder », « ur gwir ekosistem »... Degemer mat e The Land, templ breizhat ar « vuhez nevez war ar maez ».

Ur merk hag ur c'hampus eo The Land (« an douar » e saozneg) war un dro. En em gavet e oa e Breizh e 2020, en Il-ha-Gwilen. Ar « c'hampus kentañ gouestlet d'ar vuhez war ar maez en Europa »<sup>1</sup> eo, sañset. E Roazhon emañ ar c'hampus pennañ war 14 devezh-arad a zouaroù. Daou all, bihanoc'h, a zo e Gwitreg hag e La Gherche.

« Ul lec'h evit en em stummañ, evit prederiañ, evit ar sevenadur, an neveziñ sokial hag embregerezhel evit diorren hon tiriadoù » eo The Land hervez e lec'hienn. « Brudañ ar vuhez nevez war ar maez hag an doareoù nevez da vevañ war hon tiriadoù » eo o fal. E The Land e vez bodet ouzhpenn da dregont embregerezh disheñvel, war-dro dek skol uhel brevez en o zouez, met ivez Enzyme, ul lec'h ma vez sikouret an dud yaouank a glask sevel un embregerezh ennañ, ha « le 7 », ul lec'h sevenadurel ma vez aozet prezegennoù ennañ.

Tri lise prevez katolik a gaver ouzhpenn : liseoù Saint-Exupéry

Roazhon (418 lisead e 2023-2024), Gwitreg (207 lisead) ha La Gherche (102). Dindan gevat gant ar Stad e vezont tout. Stummadurioù e tachennoù al labour-douar, ar boued, an endro hag ar servijoù d'an dud a c'heller ober enno, eus ar c'hlas pebare betek 2 vloaz goude ar vachelouriezh. Koshoc'h eget « The Land » int tout. Lise Roazhon, a veze anvet Lande-du-Breuil gwechall, a oa bet krouet er bloavezhioù 60. Eus ar c'hCNEAP, ur rouedad skolioù labour-douar prevez, eo ezel The Land ivez, dre ar gevredigezh a vez meret ganti, hec'h anv « groupe scolaire

d'enseignement agricole privé Antoine de Saint-Exupéry ».

« Un doare nevez da stummañ an dud (...) », « a vez soñjet evit aesaat bleuñvidigezh, keodedouriezh, diorren personel ha micherel an deskarded ». Brav eo ar skeudennoù a weler

e lec'hiennoù ha bruderezh The Land. Met n'eo ket ken brav ar jeu pa seller a-dost.

## SKOLIOÙ A GOLL ARC'HANT

1,2 milion a euroioù kollet e-pad ar bloavezhioù 2023-2024, pa oa raktreset er budjed e vije 75.000 euro. D'ar Merc'her 27 a viz Eost 2025, un nebeud devezhioù a-raok an distro-skol, e voe lavaret kement-se da zileuridi an

**« Evidon me  
eo bet nullet  
emvodoù prientiñ  
an distro-skol  
peogwir ez eus  
bet goulennet  
prizachañ ar  
c'hontoù. »**

1] « Rennes : The Land ouvre le premier campus européen de la ruralité », Stéphane Le Tyrant, ActuRennes, 5 a viz Here 2020, pajenn bet gwelet e miz Genver 2026



implijidi ha da gelennerien an tri lise labour-douar prevez katolik. Ha gwall souezhet e voent. Padal, mizvezhioù a oa e oant o c'houlenn kaout o sell war kontouriezh al liseoù, rak « amsklaer » e oa, hervezo.

Goude-se e voe kaset posteloù gant renerien al liseoù evit lavar e oa nullet emvodoù prientiñ an distro-skol. « *Ar wech kentañ eo. D'an devezh-se e pleustromp evit an distro-skol. Aozañ degemer al liseidi a reomp, kaout hon implijoù-amzer, anavezout ar gelennerien nevez, gouzout peseurt liseidi a vo en hor c'hlasoù...* », eme Elmina Mottin, kelennerez ha dileuriadez ar sindikad CFDT. « *Anat eo din-me : nullet eo bet*

*peogwir ez eus bet goulennet prizachañ ar c'hontoù gant hon dilennidi e-pad ar C'huzul ekonomikel ha sokial (CSE), d'ar 27 a viz Eost », emezi ouzhpenn.*

Ne vez ket komzet a-walc'h eus al liseoù gant The Land, a gav d'ar c'hoskor ivez. Meur a gelenner en deus lavaret da *Splann* ! n'en doa ket ar gwir da vrudañ e-unan oberoù bet kaset da benn gant al liseidi pe an dorioù digor. Servij ar c'hehentiñ an hini a ra war-dro an dra-se, gant pemp implij leunamzer e 2023. Met al liseoù ne vezont ket gwelet kalz er bruderezh. Ar skolioù uhel a vez gwelet splann, avat. 418 lisead a oa e lise Saint-Exupéry Roazhon e 2023-2024<sup>2</sup>.

2] « Données statistiques sur l'enseignement agricole en Bretagne Rentrée 2024 – Données au 1<sup>er</sup> octobre 2024 », Draaf, miz Kerzu 2024

# « Afer Jean-Marc Esnault eo The Land. E vennozh eo dezhañ. »

40 nebeutoc'h a oa en distro-skol 2025.

D'an lhedrea, unan eus an dek skol uhel a zo e The Land, e oa bet kaset ar BTS ACSE (dielfennañ, delc'her ha kaout ur strategiezh evit an embregerzhioù labour-douar) a-bep-eil e-pad daou vloaz, zoken. N'eus nemet tri eus an dek studier o deus bet o diplom, hervez ar pezh a ouzomp... Deuet eo ar BTS en-dro d'al lise, neuze, d'an distro-skol 2025.

## **OBEROUR, PREZEGENNER, EKONOMIST, SOKIOLOGOUR HAG OUZHPENN EO RENER AL LISE**

« Afer Jean-Marc Esnault eo The Land. E vennozh eo dezhañ, a gav da Varianne<sup>3</sup>, ur gelenner e a zo o labourat el lise c'hoazh. Al liseidi eo a gont evidomp-ni, er c'hontrol. »

Hir e varv, disto e benn, lunedoù du gantañ war e fri : pennrener The Land

eo Jean-Marc Esnault. En e lec'hienn bersonel e skriv — en trede gour — eo-eñ « *prezidant-diazeour ar font leveoù La Terre et les Hommes hag an arnodva mennozhioù Terre d'avenir* », met ivez « *diazeour ar gelaouenn Ruralités gant an Embannadurioù Ouest-France* ».

« Levrioù-arnod en deus skrivet ivez, a vez diazezet war un doare lies-diskiblezh ha dene-

*lour* », a c'heller lenn en e lec'hienn ivez. E 2022 en doa embannet *Bienvenue dans la nouvelle ruralité, partons à la reconquête de nos campagnes !* gant an embannadurioù L'Harmattan. E 2024, goude-se, e oa deuet maez *L'Homme face aux défis du monde contemporain : une réflexion sur notre avenir*, gant ar memes embanner.

Tud 'zo o deus kontet traoù all deomp diwar-benn e vuhez vicherel, avat : « *Gant ur gevrat labour sikouret e oa bet gopret Jean-Marc Esnault er bloavezhioù 1990. Kasour e oa en unan eus liseoù ar strollad. Aet eo war-raok el lise tamm-ha-tamm, betek mont da bennrener* », eme Hélène<sup>4</sup>, ur gelenner e aet war he leve nevez-zo. « *Kelennet en deus war an deskadurezh sokio-sevenadurel ivez* », eme c'hoazh Jean-Romain Chapy, kelenner ha dileuriad ar sindikad CGT-EP (deskadurezh prevez).

Eus al lodennoù-se eus e vuhez vicherel

3] An dud anavezet dre o anv-bihan hepken a zo bet dizanvet

4] An dud anavezet dre o anv-bihan hepken a zo bet dizanvet

ne ra ket anv Jean-Marc Esnault en e skrid-buhez. Gwelloc'h eo dezhañ skrivañ eo « *bet stummet war ar micherioù a ekonomist hag a sokiologour. Studiet en deus politikerezhioù an implij ha diorren sokial an aozadurioù* ». E lec'hienn We Champ<sup>5</sup>, un ajañs prezegenourien, e c'heller lenn en deus « *ur vouezh levezonus e tachenn an treuzkemm ekologel ha kevredigezhel* » zoken.

## **DAOUZEK LABOURER HA TRI-UGENT O DEUS KUITAET AL LISEOÙ E-PAD AN DEK VLOAZ PASEET**

N'eo ket ken brav an traoù pa vez anv eus darempredoù ar rener gant koskor e liseoù. « *Huñvreoù fall a ran c'hoazh* », eme Cécile<sup>6</sup>, bet gopret gant The Land gant ur gevrat prevez un nebeud bloavezhioù a zo. « *Ne chom ket pell an implijidi ken abaoe m'eo deuet an Aotrou*

*Esnault (abaoe 2015 d'an diwezhatañ eo rener ar strollad liseoù Saint-Exupéry<sup>7</sup>, NGAS). Diaesterioù bras a zo gant e zoare da verañ an dud* », eme Hélène, ur gelennerez aet war he leve ar bloaz tremenet, keuz enni. « *Gant gerioù ur manager dibasaet e ra, kavout a ra dezhañ emañ e penn un embregerezh eus ar c'hCAC 40* », eme Varianne, ur gelennerez a zo e-barzh ar stal c'hoazh.

**« Anken, stress,  
gwask... Ur c'holl  
bras eo, ne reont  
ket van eus  
an dud. »**

« *A-raok The Land e veze gwelet Jean-Marc Esnault e sal ar c'hoskor ur wech an amzer. Evit an distro-skol e kase ur postel degemer deomp, gwelet e veze e-pad emvodoù fin ar bloaz, d'an distro-skol, eme Elmina Mottin. An traoù ret da vat a veze graet gantañ, pas muioc'h, met bremañ ne vez ket gwelet tamm ebet ken.* »

« *Daouzek den ha tri-ugent en deus kuitaet al liseoù, e-touez al labourerien gant ur statud prevez (n'eus nemet ar gelennerien a vez paeet gant ar Stad en deskadurezh prevez dindan gevrat, NGAS)* », hervez Annie Chaplet, kelenner aet war he leve e miz Gwengolo, ha dileuriadez ar sindikad CFDT.

Ehanet e vez kalz labourerien gant o medisin ivez. « *Start eo ar jeu gant kalz gopriddi : blinaet int, ankeniet, streset, diwaskañ poan a reont... Ur c'holl bras eo, ne reont ket van eus an dud* », emezi c'hoazh. « *Ne c'hell ket*

*padout ken* », a zispleg Boris Genty, dileuriad rannvroel ar CFDT.

E kentañ c'hwec'hmiziad 2025 e oa komañset tud ensellerezh al labour da lakaat o fri e mont en-dro The Land. Dilennidi ar c'hoskor o doa lakaet anezho da ziwall, ha kaset ugent testenñ ouzhpenn. Goulenn ali ur c'habined audit (Hunt) en defe kinniget Jean-Marc Esnault ober neuze, kentoc'h.

5] « Jean-Marc Esnault », lec'hienn We Champ, pajenn bet gwelet e miz Genver 2026

6] An dud anavezet dre o anv-bihan hepken a zo bet dizanvet

7] « Le groupe Antoine-de-Saint-Exupéry est né », Eric Chopin, *Ouest-France*, 30 a viz Genver 2015



Gant se e vefe bet echuet gant al labour ensellañ. « Pellgomzet hon eus d'an ensellerez. Komprenet he doa e oa bet goulennet an audit-se gant ar renerezh hag ar CSE asambles, emezi. Met ne oa ket, mod ebet ! » eme Annie Chaplet.

« Ouzhpenn da se, bewech ma kinnigemp ober un enklask war ar riskloù psikologel ha sokial e-pad ur CSE e veze ampellet, kaset d'un deiz all, luziet e oa, ne oa ket e mod-se e oa dav ober... Bloavezhioù 'zo e pad an dra-se... Padal n'en dije ket kousket muioc'h eget 200 fotokopienn ober an enklask hon-unan, tra ken ! » eme Jean-Romain Chapy ivez. Rediet eo an implijer da wareziñ yec'hed korfel ha

speredel e c'hopridi. Kas un enklask war ar riskloù psikologel ha korfel a c'hell bezañ e-touez e redioù hervez lezenn<sup>8</sup>, neuze. Klasket hon eus mont e darempred gant ensellerezh al labour ha gant renerezh The Land meur a wech. Hini ebet anezho n'en deus respontet deomp.

## PEVAR ENSELLEREZH BET GRAET PE WAR OBER E 2025

Ne oa ket ar wech kentañ e veze goulennet gant an implijidi e vefe diwallet. Er bloavezh 2023-2024 e oa bet un emsav el liseoù. Goulenn a rae an implijidi e rofe Jean-Marc Esnault

8] Mellad L4121-1 Kod al Labour gall, lec'hienn Legifrance

e zilez. D'ar mare-se o doa gouezet tud ar c'hoskor ez afe roadenn arc'hant ministrerezh al labour-douar war zigresk, hag e vefe dilamet nav fost-labour?

Menegiñ a rae an implijidi ivez ne veze ket gwelet al liseoù a-walc'h e-barzh The Land. N'en deus ket cheñchet e ali Jean-Marc Esnault fas d'an emsav-se. Difennet en deus e groudigezh e kazetennoù ar vro, hag e seizh postel bet kaset d'an implijidi gantañ etre an 8 a viz Du 2023 hag an 3 a viz Genver 2024. 35 pajenn etre tout.

Evit klozañ an heuliad lizhiri-se e skrive neuze : « *Evel ar filozoferien stoik, n'on ket prest da lakaat*

*ar raktres-mañ da vont war un hent di-sheñvel diouzh an hini a zispenn bremañ, peogwir e kredan a-greiz-kalon ez eo hennezh an hent gwellañ da doullañ evit ma vevfe ar raktres, en tu all din ha d'ar momed-mañ [...]. Ha gwazh a se ma vez treuzkompren abalamour d'an dra-se.* »

D'ar 4 a viz Gouere 2024 e voe sinet un emglev a baouezas gant an emsav-se.

« *N'o deus ket doujet outañ* », eme Jean-Romain Chapy. N'eus

ket bet skrivet raktres skol nevez ebet james, ha pa 'z eo ret ha meneget en emglev. Ken kozh ha 2022 eo an hini diwezhañ. « *Ur stur eo ar raktres skol evit skipailhad ar gelennerien. Gantañ e*

# Daoust da sinadur un emglev, n'eus ket bet skrivet raktres skol nevez ebet.

*c'hellont aozañ traoù a glot gantañ hag an talvoudegezhioù meneget ennañ. Un ostilh eo ivez evit eskemm gant an dud a labouromp ganto, gant ar familhoù hag al liseidi », a zisplege Annie Chaplet deomp.*

Ar re o doa kemeret perzh en emsav e 2023-2024 eo a vez lakaet da gi-

riek eus ar gollvezh arc'hant a zo bremañ.

« *24 miz 'zo e vez lakaet kement striv a reomp en arvar. Ur bloavezh*

*enkadenn sokial a-bezh, oberoù evit distabilaat ac'hanomp, ar vrud fall graet deomp (e Roazhon peurgetket) o deus bet efedoù war hor goprañ tud, hor merañ hag hor c'hempouez ekonomikel », a*

**Pevar enselladenn  
e oa bet graet  
e 2025.**

9] « Près de Rennes : ces enseignants des trois lycées agricoles The Land veulent la démission du directeur », Brian Le Goff, *ActuRennes*, 22 a viz Meurzh 2024

skrive-eñ d'e goskor en ur postel, d'an 28 a viz Eost paseet.

E-pad daou vloaz o deus skrivet dileuridi ar c'hoskor d'ar re a-us dezho, d'ar c'hCNEAP, da renerezh an deskadurezh katolik, d'an eskopti, da Renerezh rannvroel ar boued, al labour-douar hag ar c'hoadoù (Draaf), pe c'hoazh da vinistrerezh al labour-douar. O tihuniñ

emañ lod anezho, a-hervez. « *Cheñchet eo an traoù abaoe m'eo en em gavet Fabrice Henry (e-karg eus ar stummañ, NGAS) en Draaf* », hervez Annie Chaplet.

Galloud a ra *Splann* !, neuze, disklozañ ez eus bet graet meur a enselladenn abaoe

an nevez-hañv tremenet. Lod a zo echu ha lod all a zo war ober c'hoazh : ensellerezh penn-renerezh an arc'hant publik e miz Here 2025 ; ensellerezh ar ministrerezh diwar-benn doujañs ar gevrat Stad-kevredigezh. « *An Draaf he deus kontrollet ar BTS ACSE ivez* », eme Jean-Romain Chapy. Kontrollet eo bet ar c'houkvaou ivez gant servij yec'hed publik ha tud nammet Kêr Roazhon, rak lakaet e oant bet da ziwall ne oa ket prop a-walc'h kouskva al liseidi. Pa oamp bet darempred gant an DGFIP e oa bet nac'het hor goulenn atersadennoù.

## KLOZ HA KUZH AR C'HUZUL-MERAÑ

« *Ret eo dezhañ mont kuit, n'eus tu all ebet* », hervez Jean-Romain Chapy, a gomz evit an holl sindikadoù. N'eus nemet un dra : kuzul-merañ kevredigezh merañ Saint-Exupéry an hini a ziviz. Rak en deskadurezh labour-douar prevez ez eo ar c'huzul-merañ an hini

a c'hopr hag a bae renerien al liseoù, evel Jean-Marc Esnault. « *Kuzh da vat* » e seblant ar c'huzul-se bezañ da zileuridi ar c'hoskor.

« *Ne c'heller mont e-barzh nemet o vezañ pedet gant hor c'hamaraded* », eme Hélène. « *Prezidant*

**« Prezidant  
ar c'huzul-  
merañ n'heller  
ket dispartiañ  
anezhañ diouzh  
ar pennrener,  
Jean-Marc Esnault.  
Un daouad  
a zo anezho. »**

*ar c'huzul-merañ n'heller ket dispartiañ anezhañ diouzh ar pennrener, Jean-Marc Esnault. Un daouad a zo anezho* », eme Annie Chaplet ivez, keuz enni. N'eo ket ret da guzulier-merañ al liseoù labour-douar prevez degemer dileuridi eus ar c'hoskor nag eus ar Stad enno. Ar pezh a vez graet el liseoù publik dre ret<sup>10</sup>.

Kerent al liseidi, er c'hontrol, a vez izili dre wir eus kevredigezh merañ Saint-Exupéry, hervez he statudoù. N'eus hini ebet er c'huzul-merañ er mare-mañ. Goulennet he deus kevredigezh kerent liseidi deskadurezh libr Saint-Exupéry bezañ pedet d'an

10] Mellad R811-12 Kod ar Pesketaerezh war ar maez hag ar mor, lec'hienn Legifrance

emvodoù-meur e 2025. N'he deus bet respont ebet. Goulennet hon eus gant ar c'hCNEAP, gant ar c'huzul-merañ ha gant renerezh The Land atersiñ anezho. Hini ebet n'en deus respontet deomp.

Doareoù giz-kozh a zo diaes da grediñ. Met e mod-se ez a en-dro an deskadurezh labour-douar prevez. Just a-walc'h ez eus bet kaset ur c'hinnig lezenn gant kannaded eus Talbenn Nevez ar Bobl (NFP) d'an 11 a viz Gouere 2025. « *Gwellaat treuzwelusted ha perzh dileuriañ kuzulioù-merañ al liseoù deskadurezh labour-douar prevez.* » Da zeiz kentañ vakañsoù an Hollsent, ar Gwener 17 a viz Here, labourerien an tri lise o deus resevet ur bedadenn

d'un emvod-kelaouiñ aozet gant deskadurezh katolik Il-ha-Gwilen, ar c'hCNEAP ha ministrerezh al labour-douar. Danvez an emvod : « *Mont war-raok ha kenderc'hel gant obererezh ar strollad liseoù Saint-Exupéry.* »

Un nebeud devezhioù a-raok en doa lakaet renerezh The Land da c'houzout da gazetennoù ar vro e oa o vont da zigeriñ ur c'hampus nevez e Gwitreg, daoust d'ar c'holl bras-divent a 1,2 milion a euroioù bet diskuliet nevez-zo. « *Klotañ a ra gant ezhommoù embregerezhioù an tiriad* », a lavare e rener, Jean-Marc Esnault, d'ar gazetenn *Ouest-France*<sup>11</sup>.

**Chloé Richard, Faustine Sternberg**

---

11] « Nouveau campus, nouvelles formations... Comment Vitré aspire à devenir une ville étudiante », Justine Montauban, *Ouest-France*, 29 a viz C'hwevrer 2025



## Koumanantit d'hol lizher-kelaouiñ

Resevit bep miz keleier ha ne gaver neblec'h all ebet, ha bezit kelaouet bep tro ma vez embannet un enklask nevez ganeomp. Digoust eo ! Evit en em enskrivañ : [splann.org/infolettre](http://splann.org/infolettre)

## Hag anavezout a rit Splann ! ?

Ur strollad kazetennerien o labourat e Breizh omp, c'hoant ganeomp kelaouiñ diwar-benn an endro ha gwirioù mab den lakaet en arvar. Abalamour ma oa bet klasket gant tud'zo mirout ouzh kelaouennerien d'ober o micher dre gas anezho dirak ar justis ha spontañ anezho (Ines Leraud en o zouez), hon doa divizet krouiñ *Splann !* e 2020.

Diwar skouer *Disclose*, hor media paeron, e fell deomp kas enklaskoù da benn ha lakaat anezho en linenn war hol lec'hienn, ha war reoù mediaoù kevelerien, en ur mod digoust, e galleg hag e brezhoneg.

En deiz a hiriv zo ur skipailh kazetennerien gopret gant *Splann !* o labourat en hor sez e Gwengamp. Kelaouennerien all a vez paeet ganeomp d'ober an enklaskoù ha tud a youl-vat a vez o sikour e meur a vod evit kas hor c'hefridi da benn.

## Ur media dizalc'h...

Evit gellout lakaat hor fri e-barzh aferioù kizidig e rankomp bezañ dizalc'h e-keñver ar gal-loudoù politikel hag ekonomikel a-bep-seurt. Ablam da se e nac'homp degemer arc'hant liammet gant bruderezh ha yalc'hadoù digant ar strollegezhioù lec'hel. Diwar donezonoù kantadoù a lennerien (erezed) e vev *Splann !*

Ar stumm kevredigezhel a zo ur mod deomp da chom emren ha mestr war hor media. Levezon ebet o pouezañ warnomp gant kevranerion binvidik. Izili hor c'huzul-merañ a vez dilennet bep daou vloaz, hag ur c'huzul-evezhiañ a zo bet krouet ganeomp evit ma vo doujet d'hor statutoù, dreist-holl e-keñver orin an arc'hant dastumet ganeomp. Ur c'huzul stur-embann a zo ivez, dezhañ da zibab danvez hon enklaskoù.

## a zifenn ar c'hazetennerezh a hir dermen...

War an tu kontrol eus an tabutoù a ra o reuz war platoioù ar chadennoù « keleier penn-da-benn », e labouromp da-vat war doserioù luziet, ha talvoudus evit an holl. Eus saotra-durioù an uzinoù betek ar feulster revel en Iliz katolik, freuz ar c'harzhaoueg, dismantr ar servijoù publik, e kasomp da vat enklaskoù a hir dermen, o sevel skipailhoù kazetennerien gouest da studiañ an aferioù e-pad mizvezhioù ha mizvezhioù.

Ur wech embannet an enklaskoù ganeomp e kendalc'homp da chom war evezh evit degas keleier fresk diwar-benn an aferioù-se, dre hol lizher-kelaouiñ digoust, bep tro ma vez dav.

## evit bezañ kaoz eus cheñchamantoù war vat

D'hor soñj n'eo ket ar gazetennnerien arvestourien bennak buhez ar bed. En enep da se ez int aktourien pennañ a gas treuzfurmadur ar gevredigezh. Ar pezh a fell deomp ober eo reiñ ur ster da zardvoudoù hor bed, lakaat war wel ar pezh a fellfe d'an dud galloudus

kuzhat, ha reiñ da c'hoût da bep hini penaos en em zifenn eus ar gwalloberioù war an endro, war an onestiz ha war wirioù mab-den.

Evit se e rank hol labour kazetennerezh enklask bezañ skignet puilh. Setu perak emomp e darempred gant mediaoù lec'hel, broadel hag etrevroadel zoken, evel *France 3 Breizh*, *Reporterre* pe *Mediapart*.

Da-bep-seurt mediaoù e fell deomp kinnig hon enklaskoù da embann, a-benn kizidikaat lennerien ha selaouerien nevez, dre ober gant an abadennoù podkast, video, pe moulladurioù levrioùigoù.

E lec'hioù a-bep-seurt ez eomp da ginnig hol labour war an dachenn, er skolioù, er salioù lies implij, pe er festivalioù, pedet gant kelennerien, levrierien pe kevridegezhioù.

## Bevañ a ra Splann ! diwar ho tonezonoù



E 2024 e teue 72 % eus arc'hant Splann ! eus an donezonoù, poentek pe miziek, roet hep tamm eskemm ebet gant 1.800 lennerez ha lenner. Deomp eo ur redi evit dont a-benn d'ober al labour kazetennerezh enklask dizalc'h a zifennomp.

O vezañ ma n'hon eus tamm ranndal ebet da resteurel da zen, e c'hell an arc'hant dastumet lakaat hor skipailh skridaozañ da greskiñ. E 2024 neuze, e oa bet gouestlet div drederenn eus hor dispignoù d'ar goproù, dirak ar produiñ videoioù, tresadennoù, stlenngraferezh ha frejoù justis liammet gant hon enklaskoù.

**Diouzh ho tonezonoù e vo an dazont. O vezañ ma ra Splann ! labour a-laz hollek e c'hellit tennañ betek 66 % eus ho prof diwar ho tailhoù.**

Gallout a rit reiñ :

enlinenn dre ar chomlec'h : [splann.org/br/archantaouin](https://splann.org/br/archantaouin)

gant ur chekenn war anv *Splann !* : kaset da *Splann !*

Ti ar vro, 3 plasenn Maez ar Roue, 22200 Gwengamp

## Titouroù da gas deomp ?

Titouroù pouezus evit ar gevredigezh 'zo ganeoc'h ? Dokumantoù kizidig pe danvezioù e rankfe Splann ! enklask diwar o fennoù ?

Kasit deomp ur postel kentañ gant ur chomlec'h hep hoc'h anv (gant un anv fals ma karit) a-benn displegañ deomp eus petra 'zo kaoz berr-ha-berr. Gwelloc'h eo implijout posteloù evel Protonmail. Respontet 'vo deoc'h penaos ober evit kenderc'hel an tabut ha kas deomp an dokumantoù.

**Mont en darempred**

[contact@splann.org](mailto:contact@splann.org)

Splann !, 3 plasenn Maez ar Roue, 22200 Gwengamp

## Lennit hon enklaskoù diwezhañ war splann.org

- Breizh : *c'hwezh an amoniak er maez*, Caroline Trouillet, miz Even 2021
- Iberdrola. *Pa vez louz ar jeu gant an energiezh « naet »*, Itzel Marie Diaz, Lena Lopes, miz Meurzh 2022
- Metan : *Bec'h d'an atant*, Julie Lallouët-Geffroy, Raphaël Baldos, miz Gwengolo 2022
- Essure : *drouk mouget e korf ar merc'hed*, Juliette Cabaço-Roger, Faustine Sternberg, Guy Pichard, Rozenn Le Carboulec, miz Here 2022
- Moc'h fall, Inès Léraud, Kristen Falc'hon, Floriane Louison, miz Gouere 2022
- Brezel ar parkeier, Julie Lallouët-Geffroy, miz Gwengolo 2023
- Cooperl : *enklask war un embregerezh pemoc'h ramzel*, Kristen Falc'hon, Ivan Logvenoff, miz Du 2023
- Keuzioù ha girzhier en arvar, Yann-Malo Kerbrat, Nolwenn Weiler, C'hwevrer 2024
- Klañv eo porzh Sant-Nazer gant e industriezhioù, Samy Archimède, Itzel Marie Diaz, Gwengolo 2024
- Mengluzioù pistrius e Breizh, Célia Izoard, Morgan Large, Catherine Le Gall, miz Du 2024
- Aodoù Breizh : *temptadur ar betoñs en arvor*, Jérémie Szpirglas, Denis Vannier, miz Genver 2025
- Ospitalioù publik : *un distruj programmet, ur marc'had evit ar gennad prevez*, Isabelle Jarjaille, Caroline Trouillet, Raphaël da Silva, miz Gouere 2025
- Ar gennad prevez oc'h ober e doull el liseoù labour-douar, Chloé Richard, Faustine Sternberg, miz Du 2025

### Splann !

Ti ar vro  
3, plasenn Maez ar Roue  
22 200 Gwengamp

### Penn renner an embann

Alain Goutal

### Kazetennerien

Chloé Richard  
Faustine Sternberg

### Tresadenoù

Atelier Lugas

### Bet heuliet gant

Faustine Sternberg

### Difazhiet gant

Julie Lallouët-Geffroy,  
Caroline Trouillet

### Laket brav gant

Anne Caillet-Leroy

### Troidigezh

Lena Catalán  
Riwanon Kallag

### Adlennet gant alvokadez

Claire Simonin

Mouller Roudenn

ZI de Bellevue  
BP 10129  
22 201 Gwengamp

Menegoù lezenn :

1<sup>re</sup> trimiziad 2026

ISSN: 2800-664X

Embannet e miz Meurzh  
2026

Levrig n°11

